


Feiz·ha·Breiz



HERE 1927



*Bretoned, arabad eo d'eoc'h lakât ho pugale
nag e skoliou divrezonek nag e skoliou dizoue.*

63^{es} BLOAVEZ

FEIZ HA BREIZ



- EO
- KOSA
- KAERA
- HA MARC'HADMATA
- KANNAD MIZIEK SKEUDENNET
- A C'HELL KAOUT
- AR VRETONED



FEIZ HA BREIZ a gav dor ziĝer e kement ti kristen e vez komzet ennan brezoneg.

Er Bloaz 1927

FEIZ HA BREIZ a vezo kalz kastroc'h c'hoaz; kreski a ralo eus an hanter; e vent a vezo an hini a vos ruel d'ezan pa voe krouet, er bloaz 1866, hag a viras epad 19 vloaz.

Diger e vezo n'eo ket hepken *DAR FEVAR BREIZ*, da la- varet eo da vrezoneg Leon, da hini Treger, da hini Keruz ha da hini Gwened, met ivez da hini Bretoned Breiz-Uhel o deus ran- ket deski hec'honn, nann, sloc'az, war barlenn o mammou, met el levrio; dioust da-ze, gwelet a neoc'h, e ouzont en em denna gantan brao bras, hag hep dale Breiziz a ouzo en em glevet eus an eil peus d'egle da Vreiz ha n'o devezo ken etrezo nemet eur feiz, eur yez, eur ralon.

FEIZ HA BREIZ a ralo *TRO VREIZ*; embann a ralo, gant tabennou dispar, studiadennou war hon ilizou-meur, hor chapelou, hor c'hastellou, hon tennorio a bep stumm hag a bep danvez; peadra a vezo gantan da ober eul levr evel ma n'eus ket bet moult c'hoaz hini ebet ker kaer e brezoneg.

N'eo ket 40 skrivagner eo a skriva ennan er bloaz 1927, met 50, da nebeuta.

Dioust da-ze e vezo ker marc'had mat ha lihoaz. Da gemeret en hor moulevez pe en hon lies-gwers, diouz an niverenn, ne gousto nemet 4 real hepken.

Da gemeret, diouz ar bloaz, pa ne gemeret nemet eun ni- verenn hepken, eo 13 lur ha 10 lur hepken, dre ker, pa gem- eret da nebeuta 5 niverenn.

KOUMANANTIT DA FEIZ HA BREIZ

HIZIO KESTOC'H EGET WARCHOAZ

O kas ar priz anezan hag hoc'h adres, dre ar post, d'an A. Georgelin, 4, rue du Château, Brest, C/C 44.40, Rennes.

Renavo, lennerien vat ha krennvez ker, ha bennoz Doue d'oc'h.

Plougerne, d'an 8 a viz Keruz 1926.

Y. V. PERROT,
Rener e Feiz ha Breiz.

Ma fell d'oc'h lenn brezoneg skrivet e yez Treger lennit BREIZ

Kazetenn savet evit difenn ar Fe hag ar Vro

Rener : E. AR MOAL.

Merour : An A. MIARD, 27, Bali Charner, Sant-Brieg.

Ar gazetenn a zo 15 lur er bloaz

Skriva d'an A. MIARD c/c Rennes 10.890

FOI & BRETAGNE

Revue mensuelle Catholique du Nationalisme Breton

ABONNEMENT : 10 FR. PAR AN

Adresser toute la correspondance 8, Rue de Corbin, Rennes

PRINSEZIG AN DOUR

GWALARN a zo o paouez embann eul levr dudius evit bugale,

112 skeudenn ennan

PRIZ : 20 real

Her goulenn o skriva da :

M. l'Administrateur de " GWALARN "

BOITE POSTALE 75, BREST - C/C. 96.38 RENNES

Lennit,
skignit,
mirit

Feiz ha Breiz
Kannad ar Vretoned

Da zek lur er bloaz hepken e teu ar pez,
pa gemeret, da nebeuta, 5 niverenn.

N'achetez pas de meubles avant d'avoir visité la
GRANDE FABRIQUE de MEUBLES
 BRETONS, MODERNES, LOUIS XVI et ANCIENS



Maison Louis QUEMENEUR

Fondée en 1905 Sculpteur Breton

Grand choix de Salles à Manger et Chambres à Coucher en tous genres.

Meubles à l'usage de la Campagne

Magasins de vente et d'exposition : 37, rue Louis-Pasteur, BREST

Usines à Saint-Pierre-Quilbignon

Téléph. 8-03 Brest.

Tud an ti a oar brezoneg.

Une visite s'impose

Livraison par camion-auto

FEIZ HA BREIZ

KELAOUENN VIZIEK GANT SKEUDENNOU
 Renet gant Y.-V. PERROT.

ROMANESQUE. — Breiz: 13 lur er bloaz. Feiz ha Breiz stag out: 15 lur. — Diverz Breiz: 20 lur. Skrivet da E. Gouezenn, administratour, 4, rue du Château, Brest. — G.C. 4448 Rennes.

TAOLENN AR MIZ

TAOLENN AR MIZ. — Lennit ha lakit lenn Feiz ha Breiz. Y.-V. Perrot, p. 193. — Mikael an Nobletz, J. U., p. 194. — Goude tenvalijenn, sklerijenn, G. M., p. 197. — An droul hanvel da berson, TINTIN ANNA, p. 199. — Ar Bleun-Brug e Montroulez, p. 202. — Sant-Herbod, G. P., p. 203. — Maouzig, O. CHEVILLOTTE, p. 207. — Keleier, p. 212

SULIOU HA GOEULIOU MIZ HERE

- 2 a viz Here. — XVII^{me} sul goude ar Pantekost ober a rear hילו en hia Pardou ar Hozera; oferenn-bred ha gousperou ar pardouze.
- 9 a viz Here. — XVIII^{me} sul goude ar Pantekost oferenn ha gousperou ar zil-ze.
- 16 a viz Here. — XIX^{me} sul goude ar Pantekost oferenn ha gousperou ar zil-ze.
- 23 a viz Here. — XX^{me} sul goude ar Pantekost oferenn ha gousperou ar zil-ze.
- 30 a viz Here. — XXI^{me} sul goude ar Pantekost. Gouel Hor Zalver J. K. Bone. Oferenn ha gousperou ar gouez-ze.
- 31 a viz Here. — Yun ha Vijil an Holl Zent.

LENNIT HA LAKIT LENN FEIZ HA BREIZ

An hanv eo amzer al labour-korf; en hanv eo e tustumer danvez bara d'ar c'horf a-benn ar goañv. Ar goañv eo amzer al labour-spered; er goañv eo e tustumer danvez bara d'ar spered a-benn an hanv.

Feiz ha Breiz a zo ennan magadurez-spered aozet diouz doare ar Vretoned; labourit etia d'e skignna en o zouez, breman dreist holl p'eman nozvezion hir ar goañv o tonl, c'houi holl hag ho peus c'hoaz, en ho katon, eun eulfennig karantez evit ho Bro.

Lavaret a zo bet graet, epad gouelioù brezonek miz gwengolo diveza, he devoa Breiz 10 vloaz c'hoaz da ober he dibab etre ar maro hag ar vluhez.

Ma fell d'ezhi mervel, n'eo ket diavez; n'he deus nemet lezel an traon da vont evel ma 'z eont ez kont; lezel ar galleg, en habaskder, da stlepel ar brezoneg er mez eus e di ha da azeza en e gador; lezel ar brezoneg da goll tachenn ken alies ha hendez, en tiegeziou, er skolioù, en ilizoù, e holl diez ar C'hournamant hag all; a-benn dek vloaz amañ, emañ gant gant, rak AR BREZONEG EO EN E BREIZ.

Ma fell d'ezhi beva, — ha n'oun ket evit kredi e c'hellfe sevel, e penn eur vro evel Breiz, ar stulenn fall d'en em laza, — arabad eo d'ezhi koll he amzer, dervez ebet ken; gouind a rank d'ar brezoneg kement tachenn en deus kollet... Ma 'z

eus, er barrez-man-parrez, 10 tiegez ha ne gomzer ket a vrezoneg enno ken ouz ar vugale, e ranker, en eun doare pe zoare, dont a-benn da c'hounid an 10 tiegez reuzidik-ze o deus nac'het ar Re Gou.

Evit sklerijenna hor c'hennvroiz, — ma 'z eo red, — implijit zoken ar galleg, da genta, ha roit d'ezo da lenn e *La Patrie Bretonne* (1), kasetenn nevez ar *Bleun-Brug*, savet e-pad ar Vretoned ha n'o deus anaoudegez ebet c'hoaz eus o yez o-unn; met roit d'ezo dreist holl kelaoüenn gona hag amavezet-ha Breiz: FEIZ HA BREIZ; graet eo diouz doare ar re vras: kelennadurez a zo enni; graet eo diouz doare ar re vihan: mardvaillou ha taolennou a zo enni; graet eo diouz doare ar Vretoned, graet eo diouz doare ar gristenien.

En deiz ma vezo lennet FEIZ HA BREIZ (2) e kement ti a zo e Breiz, Breiz a vezo war he zreizid, keroc'h ha sederoch'eg ebet hiskont ha ne varvo ket ken!

Y.-V. PERROT

(1) LA PATRIE BRETONNE, organ offoiel du Bleun-Brug, parait les 2^e et 4^e semaines, le 1^{er} 1^{er} a paru le 10 septembre. Abonnements: Bretagne et France, 10 francs. Rédaction et administration: 43, rue Jean Macé, Brest.

(2) Feiz ha Breiz n'eo nemet 10 lur er bloaz d'as hini a gomer da redouta pouep niverenn; aes e vez ranna 3 niverenn etre tud eur gerladenn.

Hangars agricoles métalliques
 Charpentes métalliques
 Ponts en fer
 Serrurerie d'Art
 Toutes pièces forgées et estampées.

J. BERTHOMIER
 Constructeur
 90, rue Jean-Jaures, BREST Tél. 2-75

Fermatures de magasins
 Persiennes en fer
 Grilles articulées
 Monte-charges et monte-plats
 Représentant de la Région
 Jurgens et Masset, Paris.

Silos métalliques à fourrages e Gantier's
 Représentant des Ateliers et Fonderies Gantier fils, Paris.

Tous projets et devis gratuits sur demande.

Ti kos L'OLLIEROU - L'Hosus et Jorje, deul war c'lerch
 15-17, Straed Jean-Pasteur - BREST R. 2, 114

Pa ho pezo eun dra bonnek da breza, del'bit sonj er eo en hon ti e kavoc'h ar ar pezo da pezo sag an treza breza e monchoeroù ha t'vacheroù breza. Sete, neuz ho danvez a bep arer.

Dioc'h doare ar varchedourer an t'eman a wez gwelloc'h-marchad eget Breiz fons peunni holl.

Eun atempt a gont'ral d'ra gont a vez tost a marc'hadourer ha dek d'ra gont d'ar familha breza.

GARAGE CENTRAL
 DU RUSQUEC et C^e
 17, Straed Jean Jaurès, BREST — Teleph. 0-51

Gouezenn ar merkoni:
 DONNET -:- DELAGE
 CHENARD-WALCKER -:- ROCHET-SCHNEIDER

Les 7 CV Chenard-Walcker et Donnet sont des voitures économiques, élégantes et répondant à tous les besoins.

Stock Michelin

Labourdeg stummet eus ar gwelloc'h evit soza mañ ha buzan an holl girti dre dan.

Ar c'hleri chomet a-ouch war an hant a vez d'nechet goump war ar sul hag ar gouzout.

Stal-labour karoneser. Dibrez ha liverez
 R. 1, Brest 2001 Telephone 25

Ti Frédéric LAURENT
 23, 25, 27, Straed an Tour d'Auvergne - LANDERNE

An hron intanvez LAURENT war e lerc'h
 Dreist evit ar gwezhioù sklav war reioù k'lec'hiet gant. Road Carls ha t'roterezed k'leri saoz, gartens, hounn ar hounn-goum a lap seurt. Ar Rojou k'lec'hiet-hounn a vez lakat goump da d'rou, c'lec'hiet-hounn.

Quincaillerie HAUTIN
 (Maison fondée en 1880)

Louis BERTHELOT
 SUCCESSEUR

102, rue Jean Jaurès et rue Saint-Martin
 BREST (FINISTÈRE) R. C. Brest 9343

Grand choix d'appareils de Chauffage
 Articles de Ménage - Eclairage - Articles de Bâtiment
 Toiles cirées et Nappes

MIKAEL AN NOBLETZ

1577-1652

Burzudou goude ar maro

Burzudou a c'hoarvezas kerent hag ar maro. Tud o deus touet war an Aviel beza gvellet epad an noz chapel sant Kristof o Iugeria, ha koulskoude n'oa goulouenn ebet war elenn. — Martolodet eus Eusa, a epad an noz d'heñ laerou-er eus Dunker dre zikour eur goadren Iugeria en em lakas etre o bag hag hini al laerou. — Eur marc'hadour eus Eusa, Andre ar Choz, a gouezas varam eur barr-avel p'edo e kichen porz Konk-jont o sevel eus chapel sant Kristof eur sklerjienn hevel tra a oa en o bag, hag e c'hellent kompenn ar bez o a d'ismantret. Hag ive ar sklerjienn-ze a habaskas ar mor.



Bez Mikael an Nobletz e liz Konk-Leon

13 vloaz hanter, bet er skol adatek he bugaleg gant Mikael an Nobletz a zekas d'ezh he fedennou hag he c'ha-tekiz. Bloaz arak maro ar misioner, e teuas da veza seziz, ha zoken mut. Pa veze he mamm er miz o labourat, ar verc'hig keuz a jone en ti hep gellout finval, ha paou- fred fallak a zeuz c'hoaz a-wechou d'ober goap ha da daoler mein outi. Gouzav a rae he foanig gant habask- der hag e lavare aspered he japelet a zalche en he dorn. Mikael arak heza klav e-mann, a zeuz alies d'he freulzi hag a lavare d'ezh ober evel sant Stefan, peñt evel he bour- revien. Sentit a rae ouz ar beleg santel, met kare he dije beza gouest da gomz, da c'hellout pedi Doue evel he bour- revien, nann hepken a goñt, met ive a vouez thel. Ar c'hrasse a voe roet d'ezh, met seizet e chomas, hag ouz- penn, koll a reas ar gwelad daou viz arak maro Mikael. Er zil kenta a viz mae, en deiz ma varvas Mikael, Doue a lezas an drouk-pered da daga ar verc'hig paour a voe hanvet gant an Tad Maner « *Merc'h n'han Job* ».

O veza ne c'helle ket konsekt abalamour d'he foanion ha d'he anken, e kreiz an noz e klavas eur vouez o lavare- ret d'ezh, evel pa zeufe eus an tu kleiz: « Mari Jann, te a zo reuzetid da stad; petra dalvezo d'ti da bedennou? Tro keñt da Zoue, d'ezh da bedennou, en em ro d'in-ne, korf hag ene. Me a zo eun aotrou bras, me da haro. Eurus e vezi, n'he deus ket bet amzer da respont d'ezh; spontel, n'he deus ket bet amzer da respont d'ezh: « *ar er vouez all o tont eus an tu dehou:*

« Mari Jann, gril sin ar Groaz, lavarit ho Pater, en em droit ouz Doue; an hini a zo o klask ho touella eo an drouk-pered; n'ho pezet ket aon razan, rak me a zo en ho kichen, me Mikael an Nobletz, ho tad, maro er min- tin-man. Bep gwech ma veret tuget evleze, gril evel an eus lavaret d'oc'h gand eur feiz start hag eur fiansion leun e marded hag e galloud Doue. Lavarit ho mamm gervel an Tad Jezuzit a oa en c'hichen war va zremenvan, evit ma c'hellot kovez gantan. »

Mari Jann a zentis hag an drouk-pered a rankas mont kuit, trec'het gand eur plac'hig diner, seizet, dall.

An Tad Maner a zeuz d'he c'hoarvez antrozou hag a st- konras ar vamm d'he digas da japel sant Kristof, da gount an hini a oa bet gwechall o'ch he freulzi epad he c'hlen- ved. Pa urrus er chapel, e voe lavaret d'ero edo dirak freid he mestr mat. Neuz, honen holl, e'ch astennas he muzzellou hag e pokas d'an treid-ze. Kerent he daoulagad a welas ar c'horf hag an dud a oa endro d'ezan. Deuet e oa d'ezh ar gwelad, hag antrozou e teuas ive ar c'herzet, hag e c'helle bale hep lamm skuzeler ebet.

An Anterramant

Maro d'ar zil, Mikael an Nobletz a voe aliseret d'ar- meuz varlerc'h, meurs ar Rogasionou. An anterramant a voe kaer meurbet. Dont a reas tud eus a bep lec'h, tud a oa eus a bell. An Tad Maner a reas eur brezegenn; eur zant o veuli eur zant.

Ar c'horf he voe ket laketaz etouez bezion ar re haour, evel m'en doa gouennet Mikael, met e bez antroñet an Halgouet, var goullenn ar re-man. Pa voe diskennet ar c'horf er bez, an hironn a Gervasoude, klav abaoe c'hoarvez miz ha poan d'ezh o vale, a c'hoantes diskenn da gount ar bez, evit pokat d'an arched ha goullenn ar pare. He fedenn a voe selaouet, rak an derzienn he doa a gouezas kerent; santout a reas c'hoarvez o tont eus an arched. An toullier bezion hag ouzenn hanter kant all o deus santet an hevelep c'hoarvez.

Deuet o da veza gwir evel Mikael an Nobletz komzar ar Skritur Sakr. « *Sonet tal, D'hoine, f'hoarvet siout ti- linn et siout odor balsam erud ante se* » — Ho sent, Antrou, a vlenno evel al lili, hag a roio c'hoarvez tud evel ar balsam. »

Burzudou c'hoarvezet e Konk, e Douarnenez hag o meur a lec'h all

Ar burzudou, evel m'eo bet lavaret, a c'hoarvezas kerent ha maro Mikael an Nobletz. Kenderc'hel a rajont pedi amzer goude, ha niverus meurbet. Re hir e vije o lakout holl amn. Eal ledenn hepken a gontimp varlerc'h an Tad Verjus, an Tad Maner ha festou all. An Tad Verjus a skrivas buhez Mikael an Nobletz nebet amzer goude ar maro, p'le gwir al levr a voe moulet e 1696, 14 vloaz hepken goude n'oa net Mikael eus ar bod-man.

An danu skrivagner-ze a zo tud led, gouzitek, poellek, o deus grêt enklask, pouezet mat an traou, hag e c'heller kvout bizans amn.

Ouzpenn-ze, ar re o deus bet grason kar goude pedi Mikael an Nobletz, o deus, meur a hini anez, diskleriet beteg enmpomp kalz eus ar skritour-ze a ziskouez ou an dud eus ar zetekvet kantved tud a benn, tud fur, evetiek, c'hoantaet o deus e vefe merket war baper, dirak testou, ar burzudou c'hoarvezet, evit ma talvesfent da enori misioner Breiz.

Bemdez, eme an Tad Maner, adalek ar Rogasionou 1652 (deiz ar maro) beteg hanter-herc 1654 e tirede tud da

vez Mikael an Nobletz evel da eur pelerin bras. Da c'houde, e teuas nebeutoc'h a dud, met kalz evetad.

An aotrou kont a Garna, eus kerentiez ar misioner, a oa klav gand ar derzienn abaoe daou viz. E wreg a reas le da vont da beñt evitan war bez e contr santel. Selouet e voe he fedenn (1655). Tri eus o bugale a voe ive, epad o buhez, paret eus klenvejou bras goude beza pedet o contr.

An Tad Marsel a Zantez Jenovefa, Abad Leaned Kar- mez e Brest, golet e gorf a c'hoillou, bet o kaout n'ou- zoun ket pet medisin hag euz gwelloc'h, en em erhasas ouz Mikael an Nobletz hag a reas le da vont da Lokrist. Epad ar veach e kavaz ar pare.

Nebet amzer goude, unan eus e relijuzed, an Tad Dani- el a Zantez Eufrozina, en deze an derzienn, bep vevar dervez abaoe 15 miz bennak, a zeuz da Vrest evit gwel- let ha terri a rae var e derzienn e veza eur evit gwel- let var Goullenn a reas aotrou digand an Abad da vont da Gont evit gwelad kerent. — Gand pijadur, eme an Abad, e roan aotro d'oc'h. Na vankit ket da vont da beñt var bez Mikael an Nobletz. He'ch alia a ran zoken da c'hoar- vezin digand ar pare. Ho parez a c'hell evel m'en deus va farret. » An Tad Daniel a reas evel n'oa bet lavaret d'ezan, hag an derzienn a zistagas dioutan. — Eur breur d'ezan, klav gand eun hevelep klenved, a voe paret ive, hag an daou vreur a yeas, laouen, da zaoulina var bez o maddoberou.

Neo ket hepken e Konk e rae burzudou, met e kement lec'h m'eo tremenet evel e vobez. An Tad Maner a lavare e'ch en un ziskouezas ouzpenñ 80 gwech da bec'hieren vras, evel o distrei ouz Doue.

Eus an ti b'han en doa Mikael e Konk e voe grêt eur chapel goude e varo, hag ar chapel-ze a voe voullset da Iron-Varia ar Wir-Zikour. Kalz tud a veze eno o pedi evel e Lokrist.

E Douarnenez, en ti ma voe ennan epad 23 bloaz, o c'hoarvezas ive eur burzud souezus. Eur c'hoarvez a voe Elevef ennan o seni, evel da c'hervel an dud, ha gouls- koude n'oa den o chom ennan. Nao daol kloec'h a veze Kievel peurlies, hag an dra-ze a badas epad daou vloaz (1661-1663).

An Tad Maner a c'hoantes sevel eun eur chapel e koun eus e veal santel, met n'oa den a-du gantan. Ar velen- tier hag ar bobl a eneb, gand eun na vefe rannet ar barrez. Eskob Kemper, an aotrou Ronan al Louet, o Kievel, haro eus ar burzudou grêt gant Mikael an Nobletz, a c'hoar- vezennas d'an Tad Maner ober enklask, hervez reo- lennon an liz, var vertuzion ha burzudou ar misioner. An Tad Maner a stagas d'al labour hag a c'hellas dizale- diskouez d'an aotrou 'n eskob eun niver bras a burzudou gant sinatur an testou.

Seiz amn unan anez. Eur plac'hig 19 miz, eus Ploa- re, Jann Buvant, a oa e kichen eun ti koz, frañtel e vogerion, pa gouezas an ti var he c'hein. Ar gerent, o klevet an trouz, a ziredas da glask o merc'h, met ne gav- jont netra. An tad a gredas o friket e merc'h d'indan ar veñt. E s'pered en em droas neuze ouz Mikael an Nobletz reas d'ezan eur beñt evel e verc'h. Selouet e voe, rak klevet a reas e verc'h o selouet e voe, rak klevet e voe d'zikour. Tenna a rajont ar veñt hag an douar, eiz kar- rad d'an nebeuta, hag e kavjont ar bugel kuzet d'indan an trejoun. N'oa ket mouget, 'n'he doa na goulz na droug ebet. (1661).

An aotrou 'n eskob a voe souezet o velet pebez galloud en doa Mikael an Nobletz, ha dreist-holl e spered a voe skot gand ar burzud a c'hoarvez neuze; mouez ar c'hoarvez. Sentit a reas ouz mouez ar c'hoarvez, hag ez eus da c'houlenn ar pare digand e vignon, en doa anvuzet met gwelloc'h p'edo var ar studi. Ar skuisider hag ar goni- o doo siset d'ezan e zivester; ne c'helle mui na hale na euz euz e zav. Oajet oa neuze a 83 bloaz. Goullenn a reas beza douget betek ti Vikael. Gantan edo an aotrou Amier, beleg a Gemp; person Poullan, an Tad Maner, anzer e kanab Mikael. En deiz-ze e c'hellas poueza war e d'ried hag ober eur gammed bennak (ebrel 1663). Antroz e klavas an oferen var e zaoulinn. Dont a reas nerz en e zilli, hag a nebeud e c'hellas ober labourou e garg, lavaret an oferen, rei an Urziou sakr, mont dre an es-

kopti da rei ar gonfrasion. Da fin ar bloaz, e kavaz teir oferen Neudek e iliz-veur sant Kaourintan.

Goude beza bet kement a c'hraso, an aotrou Louet a alias start an Tad Maner da zevl eur chapel en emor da Vikael Archel, p'e gwir ne c'helle ket sevel en flen, a brenas an ti hag an douar a oa ne'het n'en doa ket a arc'hant, hag an Tad Maner a oa ne'het n'en doa ket a arc'hant. Ar vouez santel, Katell Danielou eus a ha goude ma vefe rei glet ar chapel en arc'hant. Hag e gwirionez, e tri dervez e teuas 1.100 lur, epad ar bloaz kenta 7.000 lur.

Ar burzudou a gendalc'he. Eun den eus Plounevez, Fanch ar Gall, a zigagas e verc'h vitan, oajet a bemp bloaz hanter, ha seizet, da di ar misioner. Goude beza e bedet, e voal'has e verc'h er feunteun grêt gant Mikael e kichen e di. Kerent ar verc'hig a finvas he zilli hag en em lakas da vale (1663).

Awalc'h oa a-wechou pedi eus a bell. Mab eur barner eus Kemper, Kaourintan Jaureguy, bouzar, a voe vouest- let gand e vobez, Katell Bodennak, da Vikael an Nobletz, ha paret var an eur (mae 1661).

E Douarnenez, e kichen ti ar misioner, eur bugel a bevar bloaz, Yann Gouziez, a oa var e dremenvan, ha ne c'helle mui komz abaoe 24 eur; eur vignonez a alias ar vamm d'he voullstas da Vikael an Nobletz, kerent ar c'hlanvour a c'hoantes en aval hag hen debras. Pare oa.

Dan 12 a cost 1663 e voe beniget ar maen kenta eus ar chapel neuze. Epad al lid, hep ma vije drao gloz, e voe kirrou bras. Met ive eur burzud kaer a c'hoarvezas en deiz-ze. Eur bugel euz burzud kaer a c'hoarvezas Ploare, klav gand an derzienn abaoe 6 miz, en doa kle- vet hano eus Mikael, eus e vadelez e kenver ar vugale, euz o c'hoarvez euz o goul e Douarnenez, e pedas e vamm d'he gas d'ar goul. Kerent he ma tigoerzas, e voe paret.

Mont a rae al labour var arak endro d'ar chapel. Ar vugale vitan ouzann, adalek tri bloaz, a labouras. An Tad Maner a lavare a tigoisont ouzpenñ 300 karad douar. Hak- se Mikael a skuilhe e venoz var ar vugale.

Eun vamm eus Gwengat, Katell Muzellek, he doa daou vugel klav, unan dek vloaz, eun all daou vloaz. O c'hlin- nig a reas da Vikael, en eur beñt e'chouek, e pedas e vamm d'he gas d'ar goul. Kerent he ma tigoerzas, e voe paret. (Eost 1665).

Eun intañvez eus Beuzek-Kap-Sizun, Anna Guevel, deuet he droulagad da veza fall, he doa poan o'ch anout he hent. Gond unan eus merc'hed e voe kanet da di Vikael an Nobletz; goude pedi, e walc'has he daoulagad e dour er feunteun, hag e kavaz ar gwelad. Distrei a reas d'ar ger hec'h-amm, hag e reas teir lez hep sikour den ebet (24 cost 1663).

Eur mañsoner a Gemp, Fanch Mauni, a labourare var ar chapel, o velet e wreg klav ha poan d'ezh o komz, a bedas Mikael: « P'e gwir, emezan, e labouran en ho ti, goullenn digand Doue rei ar gomz d'an fried, ma c'helle kovez. » Selouet e voe; e wreg a c'hellas kovez, ha nebet amzer goude a voe pare mat.

Eun intañvez eus Eskibien, Mari Keraman, sonnet he zilli, en em voullstas da Vikael hag a voe paret ker- kent (1663). Antrozou e reas pemp lez var droad, evit mont da Zouarnenez.


Setu aze ar burzudou a c'hoarvez epad m'edol o sevel ar chapel Dizale e redas ar brud e feufe eskob Kemper da lavaret an oferen, arak ma vefe p'eurc'hraet ar cha- pel. Ar goul a voe deizet d'an 20 a viz gwengolo 1663. Diredet a reas an dud eus Douarnenez ha tro var dro, euz 40.000 bennak var a lavare an Tad Maner. An ofe- renn a voe lavaret dirak skoullenn sant Mikael Archel, Met, o pedi an Archel galloudus, an holl a zonie en e filhor, Mikael an Nobletz. En deiz-ze e c'hoarvezas eur burzud neuze. Eur bugel nao bloaz, Yvon Guelou, dall, abaoe e tri bloaz goude beza bet klav gand ar verc'h, a voe digaset d'ar chapel gand e dad hag a gavas ar gwelad.

An Tad Maner a reas neuze eur mision bras e Douar-

kent hag aet gouelou Pask ebou, setu Aotrou Tremaria en hent da Bariz. Gant son na vije bet aliet fall da zont en dro d'ar ger, e vezas kar ha loen a vech digouezet e penn e hent. Goude e iasas da n'en lakat dindan suj an Aotrou Bagot. Triek nuz e chomas gantan. Ne gouze Aotrou Bagot, Triek nuz e damm korf gant eur gouriz reu; morse, dispenn a rae e vaner Kerazan. E oa devez anik pardon breudet sant Tujan. Eur c'haer a zigarez evit ar beleg yaouank da staga da brezeg ha da labourat evit an Aotrou Doue.

Ne laras ket ya, d'an tel kenta; rak n'en doa ket otrou Tremaria komzet brezoneg dibnoz an oad a 8 vloaz. Pleg a reas goulskoude d'e vignon santel. Setu hen gantan en hent diostu. E Sant Tujan e oa a-benn neuze eur mor a dud. E oa da vat an d'usadeg o vont da gregi war dachenn ar chapel. Epad an noz e vijed et en dro. Evete oa ar c'hiz. Met setu an Tad Maner war eun d'ar zonerien sabatel-holl. Tennu a reas diganto o biniou, distaga a reas eur brezegenn vach d'ar re a oa eno ken ma iasas an dud war e lerech da bedi d'ar chapel. Neuze e lakas d'izao an dencheñt gailouek aet da zervicher an dud dister.

Epad an noz pad e voe Aotrou Tremaria, barz ar gador govez, hag an devez warlerc'h kemend all. Kelema a reas gant ar gristenien a hed ar zizun. D'ar ziv warlerc'h e labouront o doug gant ar menez kalon da bardon sant They' barz Kleden. Goude e voe digoret ar mision, barz Plogoff. Estonet e oa an Tad Maner gant e vignon pa wele peseurd tan a oa ennan. Gwechall, brevet gant e vuhez re ias ha re zidorr, an dencheñt n'en dije ket graet 50 rampadenn war e droad; otao karr pe vare'h turchennet. Hizio, e rede, bifadur-tre, dre weanojennou rust Kap-Sizun, a pigne war beg an tuchennoù, e klaske an denved kollet, dianket tre beteg en tiez-soull pella. Ne 'n em roe da gousket, nemet pa n'helle ken chom en e ziv, ha c'hoaz neuze n'en dije gwele all ebet nemet eur vete-lad plouz pe eur bern bizin. Hen ha ne oa ket evit kousket war ar plun, etre linserru eus ar fina a oa, ne rae ket ken lez figu ouz ar honed a gros. Gwechall an hec'h d'ezan sevel da 9 eur pe 10 eur eus ar mintin, hi-




Maner Lezereh, e Primelin

zio e veze, bars ar gador-govez pell a-raok an deiz. Ne deue er maez nemet gant an noz ha c'hoaz ne oa ket evit mont da ziskviz rak ar pel brasas anezi a veze implijet da bedi.

Breiz-Izel a-bez a chomas sabatuet gant eun den c'henchet tu gantan ken founnus d'e zoareou evete. Ha maez a himi a gemeras skouer warnan; en o zouez e c'heller hevel dreist-holl Aotrou Lezereh, otrou eur maner tost da Gerazan, e parrez Primelin. Hen-man a iasas da dud kapusin barz kouet Goyen, savet gant e dad.

Re hell e vefe displega penn da benn labouront Aotrou Tremaria skoulnet diwar vremen gant re an Tad Maner. Laromp hepken e oant taget o daou, er menez bloavez, gant eun derzienn peuz-er-vas pa gant da vat o kovez tud klav da vervel eus parrez Plozeur-Lanvern. Aotrou Tremaria a ginnigas mervel. Ne oa ket pare mat c'hoaz hag en em stlejas da Boudiern da roi an dour d'an Te'l Maner a oa kroget eno gant eur mision. N'helle ket mont eus e gumb, met an dud a deus d'evet hag e kovese ar wazed hag ar boted yaouank.



Maner Kerduel, e Pleuveur-Bodou

Goude beza prezeget an Aviel epad ugent vloaz dre eskopli Kemper, Leon ha Tregor, dispignet e damm ar-c'hañt hag e damm nerz da gas ar misionou en dro, e iasas da vervel er bloavez 1676 da vaner Kerduel e Pleuveur Bodou, e kichenik Lannou. Eno e veze e vere'h pennervez, kaourintina Saluden, dimezet gant Hingant a Gerizak, Aotrou Kerduel.

Graet gantan e destamant, evel eur zant, devez gant ar c'hoant da welet an Aotrou Krist, hag ar garantez evit e nesa, e reas neuze all start d'e vere'h da lezel o gonel-Mikaelou gant ar verourien laour a c'helle beza war dour Tremaria ha da ranna aluzennou bras da beorien Kleden ha Plogoff. Laket e voe e galon, barz Hiz Pleuveur-Bodou hag e gorf, barz chapel kouet santez Anna Lannou. Hounn en dou sikoret sevel ha ne c'houde-ne enni nemet eur maen, e traon ar vali greiz, gant pe-denn all ebet nemet ar re a veze kanet gant ar re baoura.

Egise eus e voe fin da vuhez Aotrou Tremaria. Miromp e ano gant doujans, ni potred Kerne, rak di-war goust e c'houezenn hag e skuisder, omp maget hizio evit kalz, gant boued nerzuz ar feiz ha merket gant pleston mat eur vuhez kristen. Anez d'ezan, d'an Tad Mikael, d'an Tad Maner ha d'o mignoned ne vije ket bet gwall grenv relijion ar vro emomp enni o vev.

Mil bennoz d'ezo ha dalc'hoamp mat d'o c'henetelou.

G. M.



An diaoul hanvet da berson

Eun dervez m'edo Jezuz-Krist o tont eus a Goadar-Breiz, e parrez Aogan, el lec'h m'oa bet o sikour eun intanvez paour da ober he gounidou, e welas p'edo oc'h en em gaout gant eur c'hrouz-hent, en eur straez disheollet brao, eun den a-c'hoatid war e vare'h, eur sae'had traou dindann; eur rozeuz-aer a oa en e c'henou ha kana a rae eur ganaouenn ludur. Jezuz a zontas e oa eur miliner hennak hag a dosteas ouz ar c'bleuz rak ne gare tostaat nemet ouz an dud onest; hogen p'en em gavas an dianaf e kreiz an hen bras, e welas oa hennan Paul Gorniok, e enebour.

— Sell 'ta, le 'zo aman, ivez, drouk-spere? emezan souezet.

— An hec'h bras a zo d'an holl, eme dad ar pe'ched.

— O tont eus a belec'h emout? eme c'hoaz Jezuz.

— Tro va eskopti an eus graet, eme an diaoul, goapius; va c'hamalad an Ankou ha me hon eus dibaret an deiz-man evid ober hon cost etouez an dud; hen en deus medet; me em eus dournet dispartiet ar greun mat ha kaset an ed fall gan!

— Evete, eme Hor Zalver, eur zae'had eneo daonet eo a zo ganez.

— Ya! eme Zatan, ha n'eo ket hepken eneo hostizien, milinerien, marc'hadourien, notered; bez ez eus ivez eneo a dalvoudegez; eneo leuneez, menez-h, kloareged ha zoken beleien.

— Siouaz, eme Jezuz-Krist, gant tristidigez; en aner eta em hezo skuilhet va gwad evit silvidigez milien Adam. Bepred e rankan gwelad unan pe unan paket en da rouejou. Pe seurt gwir ez peus war va fobl-me?

— Ar gwir en deus al louarn war yer ar maner, eme an El korniok, o c'hoarzin.

— Mat, selaou aman ganen, eme an Aotrou Krist; me a zo o vont da ober marc'had ouzit; diskrog eus an eneo a zo ganez hag e roin oute d'it da vev, eun dervez penna-da-benn, war an dour, hep poan.

— Mirout a rin va galloud? a c'houlennas an diaoul.

— Ya! eme Zoue Bethleem, gant ma n'hen impliji nemet evid ober vad d'an dud ha nann evit o enkreiz.

— Kas da c'hodellad eneo ganez, a vouc'has Paul goz; rei a ran va asant d'ar marc'had.

— Mah ar Werc'hez a gemeras an eneo saveteet, dre e drugarez, hag a c'houlennas ouz Satan, pe seurt korf en doa c'hoant da gaout evit mont etouez an dud.

— O pouez ober eur zant emaez eus person Konkored, eme an diaoul; me a fell din dere'hel e blas, evid eun dervez.

— Asanti a ran gant plijadur, eme Jezuz, rak holl dud ar barrez-ha a zo d'it nemed tri diegeziad; ar Bihaned, ar Flec'h hag ar Rammaoed; d'ar reze, hervez hor marc'had, ne c'helles ober droug ebet. Lemmel a ran eta diwarnout, evit eun dervez,

an daonedigez a c'houzavnez; epad an amzer-ze, an traou santel a c'hano da veze enebourien d'it. Ken milliget, da ziskuzia, eur pennad, a-raok koueza adarre er loen a bado da viken!

A-vech m'edo an diaoul e-unan, war an hent, ma kemeras stumik eur beleg; gwiska a eure eul lostenn zu; skoulma a eure eur gouriz seiz en dro d'o gorf; dindan eun tok blevek e touge dremm eur mout yaouank bet hodezet gant eol m'ere'h (1); hag hen ha yao da Konkored. Lavarout e vije bet graet eur zant yaouank.

P'en em gavas e bourc'h Konkored, an dud a heje o fenn en eur lavarout:

Setu aman eur person nevez hag a zo gwall yaouank da zont er barrez-man.

An tri rumm duil vat a deus laouen da zaludi an Aotrou Paul hag hen gant eur moutse'hoaz d'ezus a lavaras d'ezo ez aije dizale da venigiz d'ezo o ziez. Kaz a reas da genta e loen e marchosi ar presbital hag ez eas en iliz; chom a eure eno daonlin war ar vein, evel ma vije bet o pedi; met pedenn an diaoul a zo eur malloz evid an dud vat; endra ma rae an neuz da bedi Doue e klaske, ennan e-unan, an doare da goll ar gristenien.

Ar plad fao

Pa zavas ac'hano a-benn eun eur ez eas war eun da di ar Bihaned a oa o chem lostoc'h d'an iliz eged ar re all. Daou zen disher e oant; daou bourevez koz hag a heulic gwella ma c'hellent lezenn ar vro ha lezennou an Hiz. D'ar niare ma lakas o ferson nevez e dreid en ti edont o fosiant ouz an daol; paour e oant ha deiz vijil a oa, ha setu ma n'o devoa d'o lein nemet eur banne saubenn gant hara brennek hag eur banne laez ribot. Ar person nevez a gemeras truez outo.

— Va zud vat, emezan, daoust ha ken treut-se e vez alao ar goustereun ganeoc'h?

— O! nann, Aotrou Person, eme an ozac'h hag e wreg; eur wech, o miz hon devez ivez souebenn ar c'hig ha bara gweñt, hep bloaz, da zez ar pardon.

— Ha n'ho devez ket a c'hoant da gaout gwelloc'h?

— Siouaz! kaout c'hoant da gaout gwelloc'h n'eo ket kaout gwelloc'h eo! a respontas ar Bihan; alies pa welomp ar c'higer o vont d'ar maner e c'hoantomp, va hanter-diege ha me, azezi, eur wech an amzer, ouz taol an Aotroued, evit kaout leun hor c'hof eus an traou mat a vez warni.

— Mat, eme Baol Gorniok, gant habuskder, setu aman eur plad fao bet roet gant mamm Doue d'eur zant bras gwechall hag a dorro d'eo'h ho c'hoant; ar re o devez ar plad-se n'o deus nemet henvel ar pez o deus c'hoant da gaout ha raktal

(1) Tud a oa hag a gred, gwechall, o welet daou bodigeol ar vaziantiz e tle ar bated beza eollet gant eol unan amezou hag ar mec'hed gant eol egile; gwas-are ma felle ar beleg, rak n'ene ar mec'hed o devez baro hag ar bated a jome diav.

eman dirazo. E hresta a rankan da holl heorien ar barrez ha rak-se e teun emberr d'e gere'hat diganeoc'h; met a-walc'h eo e gaout evid amout eur wech ha pa ne ve ken Petra eo prejou bras ar re binvidik.

Ar Bihan koz hag e wreg a drugarekas an Aotrou Person a greiz kalon hag hen a yeas er mez goude beza lavaret d'ezo implia mat o amzer. Kerken an daou maonek a lakeas ar plad war eun douzrer fresk hag a zellas an eil ouz egile a-raok ober o goulenn :

— Me a fell d'in, eme an hini goz, kaout eun alumenn viou hag eur gougn avalou.

Ar gougn hag an alumenn viou a en em zib-kouezas war an daol hag an daou bried, estlammel, a astennas an dour da baka peb a damm da zehri, met ar Bihan a lavaras :

— Ne reomp ket mat o staga gant an traon lipous diec'htu; red eo d'eomp goulenn ar boued founnus da genta.

— Goulenn neuze, eur penn-leuc war ar c'hrih, Bihan !

— Pe eun tamm kig maout ouz ar ber, eme an ozac'h.

— Ya ! gand eur pastez-gad, eme ar wreg.

— Hag anduilh mogedet, eme egile.

— Ha bara gwenn.

— Ha gwin Bourdell.

Ar pezo o devoa goulennet a oa holl war an daol; edont o vont da staga ganto pa lavaras ar wreg :

— Jezuz ! hizio eman Gwener ar Groaz, va gwaz ! Ar Bihan a jomas sebezet, digor e gountell gantan :

— Gwener ar groaz, emezan.

— Dec'h edo ar Yaou-Gamblid, paotr !

— Gwir a leveres, maouez ; Gwener ar Groaz a zo, ha gant-se, yun ha vijil.

— Ne c'hellomp ket debri kig hep beza daonet.

— Ha koulsoude, va hini goz, ar plad fao-man ne vezo ket aman disul.

— Gwir a leveres ; kollet hon devezo tro da gaout eur pred mat a-raok mervel.

— Ha ne gavimp biken an dro-ze.

— Salver Doue ! dioueret ar pastez-gad !

— Hag an anduilh mogedet !

— Gmomp hep debri eus ar c'hig maout hag ar penn-leuc.

An daou goz a zelle ouz ar plad burzudus hag ouz an traou mat a oa warnan ; o c'housa a raent, digor o fronnell ganto.

— Pec'hed eo, koulsoude, lezel traou ker mat all da vont da goll, eme ar gwaz.

— An Aotrou Person, eme ar wreg en deus roet noire d'eomp d'o debri.

— A gav d'it ?

— Ya ! p'eo gwir e lavare d'eomp ober keusteur-renn vat.

— Gwir eo, ha c'hoaz en deus anzavet ouzomp o eor pechen ar plad eur zant bras !

— Neuze, ne c'hell ket hon dougen d'ar pec'hed : eun dra zakr eo ; debri a c'hellomp eta ar pezo a ginnig d'eomp hep pec'h'i.

— Eun dra vat eo zoken, me gred.

— Tanveomp 'ta !

— Debromp.

O daou ec'h astenajont an dour hag e stagjont da zanka kaer o dent er c'hig leuc, er c'hig maout, en anduilh, hep sonjal, an distera, e pasion Hor Zalter ; al lontezez he devoa o c'holllet.

An diaoul a oa chomet e kichen an nor evit sellet dre doull an alchouez. P'o gwelas o koueza er pec'hed e frotas e grabanon gant plijadur hag ez eas, hep koll amzer, da di ar Floc'hig.

Freuz-taal

En ti-ze, n'oa nemed eun intanvez hag he flac'h yaouank gand eur paotr yaouank, kar d'ezo, deuet daveto da vevel hag a oa o vont da veza mestr en eur zimezi gand ar bennehez. El lab e oa leun eur genezeuz o c'hwiari dilhad d'an dud nevez ; a gilvizien a oa ivez o labourat koat dero da ober arreheuri padus. Aotrou yaouank ar Genevez a oa el leur o lavaret ano d'ar gwaz nevez diwar henn eul loen en devoa c'hoant da brena.

An intanvez hag he merch a zigemeras ar person nevez ; goude beza komzet eus ar gouindou, eus ar c'hleved a oa war an denved, eus ar boan en divije ar heleg gand e barrisoniz, ar vamm a rankas mont da c'horo ar zaout. An Aotrou Person a stagas da gomz d'ar plac'h nevez diwarbenn he eured :

— Choui a zo o vont da goueza e gwall stad, emezan ; grason eleiz a rankoc'h kaout ; an tironnezal n'eo deus netra da ober nemet gwiska dilhad kaer, mont d'an iliz en o c'haroz, debri lipouzevez bemdez ; met gwreg eul labourer dour a rank dioueret peb chan ha pep plijadur. Divezat o vont da gousket, e rank sevel alies, e kreiz an noz, evit prederia ouz ar re glanv hag ouz ar vugale ; savet abred, evelato, e rank labourat a-laz-korf, epad an deiz muioc'h eged an holl vitizien all.

— Ar pezo a livirit a zo gwir, Aotrou person, eme Jenovefa.

— Ha neuze, eme ar fals-heleg, an dud diwar ar mez, ne vezont ket pell evit beza rivinet. Ar c'hleved war an anevaled, ar gwall-amzer, war an eost, hag eman aet ar stal da stalig hag ar stalig da netra. Hag ar vaouez he deus ar muia poan, na Petra 'ta ; epad ma vez ar gwaz er mez, e klev klemmou ar vugale ha komzou kallet ar re o devoa fiziet are'chant emni :

— Siouaz ! eme ar plac'h strafuilhet, ar wiro-nez eo adarre, Aotrou Person.

— An diaoul a gendalc'has :

— Al labourer tenn a laka an den alies da veza hegas ha rist ; ar wreg paotr a vez kemeret neuze evid eul loen mut.

— Va Doue ! eme Jenovefa, ha Nedeleg, va hini koz, a sko kement gand ar c'hezeg !

— Gwelet a rit, va merch, eme ar c'hanfart, e c'hellit trugarekaat Doue evid ar groaz ho pezo da zougen, e lec'h ma vijec'h ! bet dimez da eun denchentil n'ho pje anavezet eus ar vuhez nemed ar plijadurion.

— Ya ! ya ! Aotrou Person, emezi en eur ouela dourek, e drugarekaat a ran, met n'em oa ket sonjet e kement-se.

Ha gant korn he zavaneher e sec'he an daerou a zirede war he diou voc'h ruz-wenn.

Ar heleg yaouank a reas an neuz da veza tenet e galon :

— Selaout, paourez k'ez, emezan, me a garfe ho sikour ha miret ouzoc'h da goll karantez ho pried ; kemerit ar walenn houarn-man diganen, eur walenn ken du hag ho pleo dispar ; eun eskob bras eo en deus he roet d'in ; eur c'halloud souezus he deus rak kerken ha ma vezo laketa ouz biz eur gwaz, ar gwaz-ze a vezo d'eo'ch korf hag eme ha goude ha ma vije duk Breiz an hini e vefe.

Jenovefa a zigemeras ar walenn gant plijadur bras ; trugarekaat a reas an Aotrou Person betek davreiz gwech diec'htu hag ez eas d'e ambrog betek penn al liorz ; goude e tenas en dro, dre al lenn, evit klask he muia karet, met aet e oa d'ar park gand e gezeg ha ne gavas e kichen al lenn nemed Aotrou ar Genevez o sellet ouz al loen en doa gredet.

Eun den yaouank bras dijant e oa : laouen oa e zrumm ha skl'ér e lagad evel an heol ; ar merch ed anavez n'oa aotrou ebet ker kaer hag hen. Jenovefa a zonzas er c'homzou he devoa klevet gand an diaoul : Itron eun denchentil a dle beza kalz eurusoc'h eget maouez eul labourer ; diouz ma lavar ar person nevez e c'hellan, gand ar walenn-man, beza karet gand eur prins pe gand eun duk ; aotrou ar Genevez n'eo nemet markiz ; gwelomp eta ha sellet a raio ouzin.

Hag e treuzas al lenn da vont warzu an den yaouank :

— Ac'hanta, plac'hig koant, emezan, dibabet ez peus eur mestr eta ?

— O ! Aotrou, eme Jenovefa, gant lentidigez, eur mestr am boa p'eo gwir an atant a zo d'eo'ch.

— Neuze, va merch, eme egile, en eur c'hoarzin, da bok kenta a zo d'in.

Hag e roas eur pok d'ez.

E zaoulagad a voe c'haebet warzu ar walenn a oa ouz he biz hag e c'houlenas outi piou oa an hini en devoa he roet d'ez. Jenovefa a respontas en doa he c'havet er prad p'edo o trouc'ha get :

— Neuze, eme ar paotr yaouank, eo d'in me ivez, rak an douar a zo d'in.

Hag evid ober an hec, e lammas ar walenn diwar biz ar plac'h ; met a vec'h m'en devoa he laketa war e vez e-unan, ma santas en e galon tan ar garantez ; gant sellou fall e lavaras, goustadik, da Jenovefa :

— Red eo d'eomp dere'chel ar walenn-man kenez-treomp, emezan ; sav ganen war va marc'h ha kezeomp hon daou warzu Gwened ; evo em eus em ti eus ar re vrasoa ha ne vank netra ebet warnan ; bez' ez pezo servicheerien ; saeou seiz ; boued mat bemdez hag eur heleg a lavaro e oferenn evidont hepken.

Jenovefa a jomas souezet ha ne respontas ger, met an Aotrou yaouank a grogas emni, he zaolas dirazan war an dib, evel eur c'hrouadur hag ar manac'h a loc'has d'an daou lamm. An diaoul kuzet a-dre kein al lab a reas eul lamm-gavrig hag a ziskennas warzu ti ar Rannaoued.

Freuz ar warizi

Ar re-man, kristenien vat betek neuze, a veve en onestiz, war an douar o devoa bet digant o zad ; pep hini a labour e lod, met n'oa kleuz ebet da

zispartia al lodennou ; an tri breur a en em glevet mat : eun ero goullo a veze laosket hep bloaz d'ober an dispartia ha netra ken ; n'oa ket bet ger ebet biskouz.

Dirak dor o zi edont o zri oc'h ober ibillou gand o c'hontilli, p'en em gavas ar person ; raktal e savjont en o sav :

— Deuit en ti, Aotrou Person ?

— Nann, tud vat, kendalc'hit gand ho labour ; me a zo deuet da reketa d'eo'ch eun dervez mat hag eun eost puilh.

— Eskuzit gamecomp, Aotrou Person, a lavaras ar c'hosa ; o kempenn eskob d'hoz laz-alar emamp ; breman ne raer mui nemet traou diwar zav.

— Ha koulsoude, eme an eil, an alar-man a zo graet gand gwella kalvez a zo er barrez ha koad evlec'h en deus kemeret d'hen ober ; met hon douar a zo fall ; kallet eo ; ha tenn da arat.

— Ha setu perag, eme eun trede, eo red chench kezeg, diou wech bemdez, ar pezo a zo eun dale hag eur rivin.

— Klevet a ran ho klemmou, paotred, eme an diaoul hag ioul am eus da zont war ho sikour ; sellit an eskob-man a zo bet graet gand sant Joseph. Pa vezo laketa ouz ar zouc'h, an alar a labouro e-unan epad an deiz a raolio teir gwech muioc'h eged an eler all. Nemed e rankoc'h lenna plouz evid e gaoul rak ne c'heller rei d'ezan nemed eur perc'hen.

Tennet e voe d'ar plouz berr hag ar chans a en em gavas gand Kadou, ar yaouanka.

— Ha breman, kenavo, eme ar person, ha c'houi ho traou, diouallit en aoun da gdot gwarizi ouz ho preur yaouank ha re, en holl, a c'hoant da gemeret e beidra.

Hennan a yeas da gere'hat eun alar ; e gas a eun eun eur park ha n'oa ket bet troet an douar eman tri bloaz a oa ; staga a eure an eskob nevez ouz an alar koz hag hennan, kerken, a nijas eul eul labours war an douar ; mont ha dont a rea ha bep tro e rea eur boum dounoc'h ha ledanoc'h eget kentoc'h.

An daou vreur kosa deuet ivez da zellout ouz ar burzud a jomas sebezet ; met ar gwarizi a zavas en o c'habon hag al lorc'h e kalon Kadou :

— Hemez a zo brao d'ezan, eme an daou gosa, p'en deus bet an eskob-se ; ni a oa ken dleet d'eomp e gaout ; ar chans a oa a-du gantan.

N'i ket da ober evel an dud difeiz, eme Gadou p'o c'hlevas ; livirit 'ta edo Doue, ha nann ar chans, a-du ganen ; Doue a felle d'ezan, dre-ze diskouez d'an holl, m'arvat, ez oun ar gwella.

— Diaoul lorc'hus, eme an daou all ; Kadou a zavas doug eman.

— Il atao, emezan, arabad eo d'eo'ch dont d'am hegal, rak gand va alar e c'hellan beza pinvidik mor ha c'houi, ma 'meus c'hoant, ne vezoc'h nemet peorien.

Ar gourdrouz-ze a lakas gwad an daou all da rivin.

— Diouall, mab aer-viber ma 'z out, emezo, pe e lammimp da alar diganez.

— Deuil 'ta, ya, ma 'z oc'h tud, eme Gadou, o kregi en eur forc'h d'ev em zifenn.

E vreurder diskiantet gand ar gougnar a en em

daolas warnan evit skei gantan ; o c'hountilli a oa c'hoaz ganto, setu m'hol lazjont war an taol.

Kerkeat, en tu all d'ar c'hme e voe klevet an diaoul o c'hoarzin a-bouez penn, laonen evel eur bourc'hiz p'en deus paket eur c'houer paour.

P'en em gavas er presbital e c'houlennas ouz ar garabasin aza d'ezan a-benn e goan, eun tamm bevin fresk ha ker'chat, eus an ostaleri, chistr ha gwinn, kement hag a ranker evit mezvi daouzek lounker.

D'an ampoent e tenas eur mesager da lavaret en devoa kavet ar Bihan hag e wreg, maro-mik o daou, dindan o zaol, gand ar re govad.

Slaka a eure e vized hag e c'houlennas gwinn koz d'e goan.

Edo o vont ouz taol pa glevas ano eus eun darvoud all : Aotrou ar Gernevez, Jenovefa Floc'hig gantan war gein e varc'h, a oa dirollet e loen nevez gantan ha taolet en eun toull mengleuz el lec'h ma voent flastret o daou.

An diaoul a stagas da zansal ar jabadaol hag a

c'hoanteas kaout saladenn gant sivoliz.

Er fin, p'edo o'ch echui e goan e klevas ar c'helou-man : Kadou Rannou a zo bet lazlet gand e vreudeer hag an daou-man goude a zo bet aet d'en em grouga.

En dro-man e laskas eur youc'hadenn spoutus hag e c'houlennas eul litrad himi kreuz ; o'ch eva e vanne diveza edo pa deus Jezuz-Krist war dreuz an nor :

— Deuet eo an eur d'it Paol goz, da zistrei d'an ifern !

— Mont a ran, va den mat, eme Zatan, met kompagnunez am eus, rak ar re a oa d'it er barrez d'ec'h a zo d'in me hizio. Difennet ez poa ouzin o gwaska ; n'ez poa ket difennet ouzin o linvidikaat ha setu ar pezh am eus graet. Euz gentel eo d'it ; deski a ri, abenn eur wech all, ez eus eun doare gwelloc'h, eged ober droug d'an dud, da gemeret evit o c'holl, hag eo ober vad dezol.

— Mont a ran, va den mat, eme Zatan, met kompagnunez am eus, rak ar re a oa d'it er barrez d'ec'h a zo d'in me hizio. Difennet ez poa ouzin o gwaska ; n'ez poa ket difennet ouzin o linvidikaat ha setu ar pezh am eus graet. Euz gentel eo d'it ; deski a ri, abenn eur wech all, ez eus eun doare gwelloc'h, eged ober droug d'an dud, da gemeret evit o c'holl, hag eo ober vad dezol.

TINTIN ANNA DIWAR E. SOUVESTR.

Ar Bleun-Brug e Montroulez (1)

VA BRUDEUR BEL,

Pobl Israël, dibabet gwechall gant Doue, evit beza e bobl d'ezan, evit derc'hel start, en despet d'ar bayaned ha d'ar dud direiz a oa en dro d'ez, sklerjenn ar feiz wirtion ha doujans evit ar goue'hemennou santel e kalon an den, a oa lorc'h emm ha n'eo ket hep gwir abeg, da veza bet galvet d'ober eur seurt labour.

An Israélite, ar Yuzevien a garie pa en em zastiment evit eur goue'hemenn, karet a raent digas da zonj d'an holl, dre brezegonnoù, dre wezioù ha kantikoù, eus kement tra a vras a oa bet graet gand o zad koz, eus ar mandheron dispar o doa resevet a-berz Doue, eus ar roumd e doa bet meur a wech war dachenn ar brezel, war o enebour.

Non fecit taliter omni nationi: Doue, emezo, n'en deus ket graet kement all, n'en deus ket roet kement a luf d'an holl bobloù ; ni eo ar bobl dibabet ha karet gantan dreist ar re all.

Ar wirtionez a oa ganto.

Va migonned, en amez ma vevomp ez eus tud hag a zeblaot, e gwirionez, beza kollet pep skiant vat, klevet a reer doktored a c'hiz nevez hag a zifenn karet dreist ar broioù all ar vro m'omp bet gant ha savet emm, war zigarez ma lie an holl dud eus ar bed beza evel breudeur. O c'hou d'ezo eo an « Internationale ». Karet ar Vro, enori he banniel, a zo, war o meno, diskouez eur spereid herr hag eur galon enk.

A dra zuz an holl dud eus ar bed a zo breudeur ha n'eo ket aman, en eun iliz kristen ha dirak skeudenn Hor Zalver Jezuz-Krist stag ouz e groaz, eo ez afen da lavarout ar c'hontrol.

Holl dud ar bed o deus ar menez Mestr, ar menez Tad, an hini a zo en nenv. Prenet int bet holl gand ar menez gwad, ar gwad a siveras eus izili Hor Zalver Jezuz-Krist, war groaz ar C'halvar. N'eo ket paotred an Dispaoc'h, n'eo ket paotred an « Internationale » eo o deus digaset war an douar ar wirtionez na roet da glevet d'ar holl lezenn ar garantez. Merket eo skler ebarn an Aviel ha ma ne glaskont ket ebarn an Aviel eienenn ar wir garantez, an dud a vezo breudeur evel ar bleizid a en e zeb' an eil egile.

Vat vat va migonned, ar bed a-bez a zo evel eur famill leon ha niverus, mes bez ez eus er familhez-mour a rimm. Ar mor, ar menezioù, ar yez, ar glizion, ar feiz a lak ar rummao-jez da veza dishenvel bras an eil diouz egile. Ploa a gredfe lavaret, mar en deus daou liart skiant

vat e lie eun den yaouank kaout kement a garantez hag a zojians evit eun den estren eget n'en deus evit e dad? Ploa a c'helle tamm eur vamm abalamour n'eo teneroc'h he c'halon ouz ar mab he deus lakel er bed eget ouz eun estren hennak?

Hor Zalver, m'arvat, a oa ker bras a spereid, kel le dan e galon eget spereid ha kalon n'eus fors ploa ha koulsgoude mar en deus roet e vuhez evit ar bed holl, mar d'eo astennet e zivrec'h, war ar groaz, evit skuilh war dennoz war ar bed holl, en deus karet dreist an holl vroioù all, e vro viban ar Jude hag ar Galile. Skuilhet en deus dielou o sonjal er gwall zarvoudoù a die koueza war Jeruzalem. Lavaret a raec : Jeruzalem, Jeruzalem, nag a wech em eus c'hoantet dastum da vagije endro d'in evel ma tastum ar yar he laboused dindan he dioukell !

Gwir hon eus eta, Breiziz, va breudeur, da garet hor Mann-Vro Breiz, da gana en he enor, hag ar pezh a zo gwelloc'h c'hoaz da zifenn he feiz, he yez, he gizioù koz hag he gwirioù, ha setu aze al labour a ra hoc'h Unvaniezh ar Bleun-Brug hag ho meuli a ran eus a gemont-se em ano vavan hag en ano an Aotrou 'n Eskob a Gemper hag a Leon en deus graet d'in an enor da zerc'hel e lies en ho touez.

Difenn gwirioù Breiz n'eo ket enchi ouz ar Frans eo. Ma o'ch eus galvet aman tud eus an Alzas, eus al Loren, eus ar Flandr, eus pevar c'horn ar Frans, n'eo ket a dra zuz evit en eus glevet evit ranna ar Frans hag evit beza goudeze dispartiet en eil diouz egile.

Nann, mar d'omp bugale Breiz, ni a zo ivez bugale Frans ha kaout a romp n'omp, ket eus ar re falla evit he difenn. War 1.500.000 soudard Frans a zo bet lazlet er brezel spoutus diveza, ez eus bet 240.000 hag a oa ginidik eus a Vreiz.


Goude beza graet en doare-ze hon dever, e chellomp sevel uhel hor penn, e c'hellomp sevel uhel hor mouzioù da c'houenn ma vezo laosket ganeomp ar gwir da hon fidel d'hor yez, d'hor feiz, d'an heritach kaer hon eus resevet digant hon tud koz hag a fell d'omp lezel gant hor bugale, war hol lere'h.

Fizians am eus e teuc'h a-benn da lakat hor Breiz da veza anavezet, karet muioch-mui, gand an holl ha dreist holl gant he bugale. Servic'ha a reoc'h, evase, e gwirionez, Doue hag ar Vro.

Evise bezet gret.

(1) Prasegenenn gant e iliz Sant-Vazo d'ar 15 a v'z Gwengolo 1925, gand an A. Fichon, p'arou bras Montroulez.

SANT HERBOD



Chapel Sant Herbod

Pa 'z aer eus a Huelgoad da Bleyhen, dre Lokefred ha Lamedern e tigouezez e beg eun dorgenn ; ac'hano ez eus eur gwel meur eus ar re giera pa zeller etrezek ar c'hreisteiz ; pa ziskenner e kerzer etrezeg traoù Ellez, dre eun hent doun ha serz ; dizale, e weler o sevel eus a douez ar gwez, eun tour iliz uhel ha louet. Tro-war-dro n'eus nemet gouzere ; gwaremeier, lenneier, koajou kastell koz ar Ruskeg, eur froud a glask digeri hent a droz eur bern reter divont, eur c'horn bro dudus. Seul-vui e fostaer ouz an tour ha seul-vui her c'haver uheloc'h

uhela a-zieoc'h eun iliz vras ha kaer, sklerjennet gant p'onecher gwer a honz, gollet he mogerioù louet a givvi glas hag arc'hantel. En em gavet o'ch e Sant Herbod, e Plonevez-ar-Faou, en unan eus chapelioù kosa ha brudeta Bro-Gerne.

Sant Herbod, ginidik eus a Vreiz-Veur a oa en em dennet da genta, war a leverer, e Berrien, parrez vras divont, savet war eul lodenn vat eus a

Venez Arre, Berrieniz, e lec'h kaout evitan an doujans a oa deet a rae an heg outan, a lake o chas da redet war e lec'h hag a sflape mein warnan.

O veza ma n'oa ket evit chom, dre eno, pelloc'h, e lec'has, met o lec'het e taolas e valloz war Verrieniz : C'houi a gliske mein da deurel ouzin ; hezit d'nech, n'eo ket mein eo a vanko deoc'h ! » Hag, e gwirionez, abante ez eus kement a reier d'he eno, ma leverer ne vefe ket gouest an Aotrou Doue e-unan, da zont a-benn da zivina Berrien.

Goude beza dibabet al lec'h ma savje ennan eun ti-hedi nevez, e traon Ellez, sant Herbod a yeas da gaout Aotrou maner an Nank da c'houleml outan presta d'ezan daou ejen da charreat mein. Eun den piz oa an Aotrou-ze ; lavarout a eure raktal, krak ha berr, d'ar zant, ne roje d'ezan na kar na loen. Kaslzet kal et voe evit heza bet ker pervez-ze ; abaoe, en Nank, n'eus ket bet gelllet kaout ejen ebet hag e vije gelllet e starna. Sant Herbod a yeas e-unan, da brad ar Ruskeg, da zibab daou ejen gwenn a yeas d'e heul, raktal ; o starna a eure gant sugellou graet gant halegennou goevn eur skourr bras ha deil-houek a dalveza da gar ha gand ar c'har a c'hiz nevez-se eo e charreas mein e benifi.

An daou ejen ne falvezas ket ganto mont ken diouz ar zant rak henman a oa mat evito hag a gonze outo evel ma vije bet o komz ouz tud. Meur a vloaz goude e varo, o gwel'et c'hoaz gourvezet e porched ar penfi ; an neb a gare a c'helle dont d'o c'herc'hat da zav-heol hag o lakat da labourat edoug an deiz, met red e veze o lezel da zistrei d'ar ger da gloch'an angelus ; gwasa peza a zo, eur c'houer piz-gagn a falvezas gantan o lakat da labourat goude an eur ; abaoe n'int ket bet gwel'et ken.

Ar zant a gawe d'ezan e vije lezet, en habaskder, en toull distro-ze ; met gwallgaset e voe, dre eno, gand Aotrou ar Ruskeg, eur payan, hen tamalle da veza laeret e zaou ejen hag a gliske ober d'ezan lec'het diwar e zouarou. Evel ma ne gawe ket aes mont e-unan da glask trabas ouz an den santel e roas ar grevidi-ze d'eun den bras divent, ha krenv, evel eur marc'h, anvet Gevrel hag a oa o chom war ar menez tosta. Kement hag eur rouf e oa an den-ze ha pa dreuze koajour ar Ruskeg e

lake e zaouarn e skourrou uhela ar gwez hag e lavare : « Uhel eo ar radenn er bloaz-man ! »



Porched Sant Herbod

Garo ha gouez evel ma oa e klaskas dioc'htu laza ar zant hag e savas, a-zioe'h e benn, e votez d'her flastra evel eur preny. Sant Herbod a reas sin ar groaz ha, war an taol, Gevrel a welas e kroged ennan, dre e droad hag e voe strinket war reier Norohou, eul lea ac'hano.

E lamm a lakeas ar Menez a-bez da grenn ; ar reier a vloasas e gin hag e gostou ; adalek an deiz-se, dal ma wele ar zant o tispaka, en eun tu pe du, e rede, luana ma c'helle, da guzat dindan ar menez.

Koulskoude, dre zindan, e kendal'he da ober gwasa ma c'helle d'ar zant, Sant Herbod a blije d'ezan boda ar veserrien, eus a dro-war-dro, evit deski d'ezo kana kantiko. Ar Rouf a gavas mat c'hoari eun taol fall d'ezan o tistrei ar ster divar he hent hag ouz he lakat da ober he bale dre douez eur bern reier a lake he dour da ober eun trouz gouest da vouzara tud ha da c'helei mouez ar ganerien. Ober a eure ar pezh en devoa lakat, en e benn, met chom a eure sebezet o welet an nebeud a drouz a rae an dour o firdella d'an traon, dre douez ar c'herreg, hag an trouz-ze, e lec'h diskar ar c'han e gaerat hag e astenn ne rae ken. Fallgalonet, o welet e kolle e hoan, hep gellout ober gaou ouz ar zant, e stokas, eun dervez m'edo o vale dre an draonienn, e c'har ouz tour ar chapel hag e torras krogenn e c'hlin. Bec'h en devoe o pignat d'e doull ; e dorr a deuas a-benn anezan hag eiz dez goudeze e varve. Schellet e voe e kern ar menez dindan eun daol-vaen a anver c'hoaz Bez-Gevrel. Ker bras e oa ar rouf-se ma voe red e lakaat e nao hleg evid e ziskenn en e doull hag en devoa koulskoude nao droatad hider.

Aotrou ar Ruskeg, koumaret o klevet e oa e wreg hag e vab en em c'hraet kristenien, hep gouzout d'ezan, a en em daolas er froud hag a en em vezas.

Sant Herbod, eur wech maro e zaou encobour a vevas e peoc'h, e kichen e iliz, laouen o welet an dud o toul emni da bardona. Met e vrasa plijadur oa beza etouez al loened mut ; gouzout a rae konz



Maen bez Sant-Herbod

outo ha klevet a raent ar pezh en deveze c'hoant da lavaret d'ezo ; karet a rae dreist holl ar chal-lakorn, ar zaou hag an ejemmed, al leueou hag an onnered ha p'eo en em gavet er baradoz en deus goulemet heza o faltron. Abaoe, al loened-ze o deus kendal'het d'e gare ; pa ankoume-h e mistri o c'has d'e bardon ez eont aneo e-unan.



Dereziou Chapel Sant Herbod

Eun dra eo hag a zo bet gwel'et meur a wech. Kernetiz, hep ezoum d'o fed, a ya bep bloaz gand o loened-korn da lardona da Zant Herbod ; ar pardon a bad eur miz ; hep lun ha hep gwener a viz mae eo e vez ar muia tud ; d'ar gwener a-raok sul an Dreinded eo e vez ar muia loened ; teir gwec'h e vez graet tro ar chapel ganto ; kaset e vezont da eva dour d'ar feunteun ; kemeret a raer huntalhadou dour eus ar feunteun da deurel war boued ar chatal klanv ; rei a raer, e prof, d'ar chapel, biloston ar zaout a vez gwerzet goude ar pardon bras.

Gwechall, em A. Gwillou, epad tri dervez ar pardon hag ar foar, o'chen Kerne ne labourent ket.

Chapel Sant Herbod a zo brud anezi mil bell a zo p'eo gwir e kasus, Yann V, warbo ar bloaz 1124, e zeu a fizians di, da lavaret oferen-nou evid e vrec'h, met an iliz a weler eno bre-man, bras ha kaer evel eun iliz-veur, a zo bet graet etre ar bloaveziou 1498 ha 1516. E porched ar c'hristeiz e weler ano an Aotrou Yann de Launay, ar beleg a lakeas staga gand al labour. An tour n'eo ket bet heget hiskoaz. Tri brenestr bras a zo digoret e moger tu ar sav heul ; porched ar c'hristeiz a zo graet war stumm porched ar Folgouez hag hini Kreizker ; ennan eo renket an Daouezek Abostol a zalc'h, pep hini anezo, eur skrifell warnan unan pe unan eus daouezek artikl ar Gredo.

E diabarz an iliz, e kreiz ar c'heul, eman hez sant Herbod, eun daol-vaen harpet war hez host, skeudenn ar zant gourvezet warni, gand e vantell vras hag e gabell. Dindan e vrec'h kleiz, e talc'h eur vaz ; e levr a zo a-spilh ouz e vrec'h zehou. E kichen e dreid eur c'hi a daol evez. Eur speurenn zero kizellet kaer a ra an dro d'ar c'heul ; souezet e chomer o kaout traou labourer ker koulz en eun iliz kollet e kreiz ar gouzerri.

War dri brenestr bras ar c'heul e weler gwer a liou bet graet er XV^{em} kantved. Merket int bet eus ar bloaz 1556 ; livet int bet gand eur monrouezad, ar gwerenner Thomas Queme-ner ha lizecennou kenla e ano, T. Q. a weler warno estreded eur wech. War gwer ar prenestr brasa e weler taolennou eus ar Bastion, merze-renti sant Laurans, en tu kleiz ha sant Erwan, en tu dehou, etre ar paour hag ar pinvidik.

Skeudennou kaer a gaver er chapel ; hini ar Werc'hez, penn Eva e-harz he zred, aval ar c'holl en he dour ; hini sant Herbod, kroummet penn uhela e vaz-eskob ; re sant Erwan, Itron Varia a drouez, sant Sebastian, sant Roch hag all. Harp er chapel, etouez ar fao hag an evnelc'h, e kaver eur c'halvar het savet er bloaz 1571.

N'heller ket tec'het diouz Sant Herbod hep mont da welet kastell ar Ruskeg hag ar froud a zo en e gichen hag a ra seul vui a drouz ma he deus muioc'h a zour da zislouka war ar c'herreg.

Kastell ar Ruskeg n'eus netra ebet ken anezan, koulz lavaret, en e zav ; an iliz a zav hag a cholo ar mogerieur koz hag a stank preneber goullou ar c'hampreier kouezet en o fonll. Diou dourihell toet gand mein sklent a oa savet a bep tu da zor ar c'hastell da rei loj d'ar re a zioalle an nor-ze.

Dirak dor ar maner e weler eur pezh laouer vaen a 4 m. 10 a ledander ; eur girouennad avallou pin, gand skoned aotred ar Ruskeg a zo kizellet en dro d'ez.

An dud a lavar oa gand al laouer-se eo e veze ar Gevrel o'ch eva dour e ster an Ellez. Eul



Froud Sant Herbod

laouer all vihanoc'h a gaver e liorz ar maner. E kichen ar maner eman er vilin, goullou, siouaz, abaoe n'eo tec'het he diveza milner da glask

davez d'an Amerik. E traon ar vilin-ze eo e teu ar stier da veza froud pa rank lammet eus an eil roc'h d'eben evit kenderc'hel gant he hent. Ar



Forz Kastell ar Rusk g

c'horn-ze kelc'hel gant menezioù du ha gant goujoù dero, fao, kelen hag hilibet, a tez al logad,

hep an amzer da bara war vèziou glas ar Poher, a zo unan eus kornioù-douar braoa Breiz.

Diveza markiz ar Ruskeg, Alan ar C'hastell, ginidik eus a vaner Kerlec'h, e Gwitalmeze, a zo bet beziet e Brennilis, er bloaz 1706. E un den ker mat oa ha ker karet gand an dud diwar ar miz, ma 'z edo c'hoaz ar c'hiz, breman ez eus 50 vloaz, da denna an tok, dre zoujans, hep wech ma lavaret e ano.

Aotrou Lezobre [*J. de Lannion, seigneur des Aubrays*] eun dencheñtel eus ar XVIIth kantved a dremenas ivez, war a leverer, e vloaveziou diveza, e koad ar Ruskeg, gand eun manach koz, o pedi hag oc'h ober pinijenn. Eur heurevez, o veza ma ne zave ket evel kentoc'h, e vignon, a zellas en e beniti hag ouz e welet gourvezet her galvas meur a wech; met Lezobre ne zihunas ket: maro 'oa; gwelet a raer c'hoaz er c'hoad penadou eus a vogerioù penitioù an daou zen santel.

G. P.



Do· borz ha laouer vras ar Rusk g



Eur marvailh evit va bugale

MIAOULIG

Sent ouz ar c'horriganed, mab ar vilin, ha kerz war da giz pa n'eo ket re zivezat c'hoaz.

Youenn o lenn kement-se a jomas sebezet: — Petra, petra, emezan; penaos e oar ar re-ze e the mab eur miliner tremen dre amañ; Rampsed ha korriganed, setu aze avat eun nevez-zeñt; mat ma ouezet kement-se a draou e theit gouzout ivez, emichans, n'eo ket Youenn Penelo eun den boaz da gila; lavaret em eus ez ajen ha mont a rin.

Youenn ha Miaoulig

Ha setu Youenn er c'hoad. Kerzet a raer war ar c'hinvi bouk, dre douez ar gwez uhel ha stank; drezeñt c'het ne stanke outan an hent; eur brao e oa bale dre eno; goude beza graet eur penad mat a hent ec'h azezas e harz froad eur wezenn, hag e tispakas e vara hag e gig met n'en doa ket trouc'het c'hoaz e damm pa glevas eur vouez goapatis o kana:

Mab ar Miliner a zo kalonek

Fa, fe, fi, fo, da, de, di, do.

En eur zont er c'hoad n'eo ket bet poelleg

Fa, fe, fi, fo, da, de, di, do.

Breman eo paket, vel eun evn lostek,

Fa, fe, fi, fo, da, de, di, do.

Youenn a zav war e dreid hag a glask gouzout e pete'ch edo an hini a game, met kaer en deus sellet ne gav netra; klevet a ra neuze eur vouez all dudiusoc'h ha tamm ebet goapatis: — Taol evez Youenn baour, taol evez, rak e riskl bras emaut; pa weli e vezi o vont da goll, galy dioc'hitu *Miaoulig*; dal m'her galvi, e vezi sikouret!

Nec'helo'ch, nec'heta, Youenn a zellas hag a c'houllias, e pep tu, ha ne welas netra. Neuze, e stagas adarre gand e vara; debri a eure eur stroukoniad mat anezan gand eur bastell gig; eva a eure eur banne gwinn ha laouennaet holl ec'h en em astennas war al letoù d'ober eur c'houisk:

— Eun hunvre am eus graet, amat eo, emezan; skuit e oan ha kousket, em zav, em eus graet; ha goude ma vijen o vont da goll petra dalvesfe d'in gervel *Miaoulig*?

Evel eun huanadenn a glevas neuze en e adreñv hag evel trouz eul loen bihan o vont kuit; sellout a reas ha ne welas netra.

Youenn hag ar Ramps

Neuze ec'h en em astennas ha ne voe ket pell evid en em rei da gousket da vat; eur c'hoarza-denn spoutas hen dihunus; digeri a reas e zaoulagad hag e welas dirazan eur pikol ramps, teir

En amzer-ze e veve, e kichen Montroulez, eur miliner ha n'oa ket laer. Ya! her c'hredit, mar kirri, ar miliner-man n'en doa graet gaou ebet biskoaz ouz e nesa; eun den eun oa ha detet e oa da veza pinvidik; prenet en doa e vilin ha beva a raer enni laouen ha seder gand e wreg hag e vab Youenn.

Eur c'hristen mat e oa ar miliner; Yann Penelo oa e ano; ar beorien a ouie e anaout rak en e di e oant sur da gaout atao eur skudellad soubenn zrus hag eur banne gwinn hag eur c'horn, el lab, war ar c'holo bouk, da ziskuita o izili brevet.

Pa veze an Aotrou Person oc'h ober tro e barrez, en deveze plijadur atao pa c'helle chom da ober eur frapad marvailhant gand Yann ar vilin, gwella kristen a oa en e barrez, evel ma lavare alies.

Youenn, mab ar miliner, paotr yaouank ugent vloaz, a oa start ha krenv, evel eur wezenn zero, desket, ampart evit pep labour ha n'en doa graet biskoaz nemet levez e dud.

C'hoant en doa avat, a-raok dimezi ha kemeret miher e dad, da vont, eur penad, da redet bro, ha da aveli e benn; diskleria a eure e c'hoant d'e garent:

— Perak 'ta, va mabig paour, a lavaras e vamm d'ezan, ez afes d'hon dilezel evelse? Daoust ha ne gaves ket aman ar pez a glaskes? Koz omp, da dad ha me; le eo hol levezeg; petra raimp hep-dout?

N'am eus ket a c'hoant, va mamm, d'ho tilezel pell; n'hellan ket beva hepdoc'h; kredi ran, kouls-goude, eo mat evid eun den yaouank mont da welet eun tammig ar bed; va lezit eta da vont kuit hag a-benn eur miz bennak e vezin distro hag e chomin ganeoc'h, goudeze, evid atao.

An tad a en em lakeas a-du gand e vab hag, hep dale, hor Youenn, goude beza bet bennoz e garent, eun tamm bara hag eun tamm kig mo'ch en e zac'h, e benn-haz houarnet en e zourn, a gemere penn an hent a dlie e gas da welet penaos e yea an traou er bed er miz eus e barrez.

Youenn en hent

Bale a eure ha wardro kreisteiz ec'h en em gavas gand eur c'hoad bras; devi a raer an heol ha dudi en doa her baler o welet ar c'hoad-se e kavje eunman disheol, da c'hellout chom da zehri ha d'ober eur mored. O tostaat ouz ar gwez kent e welas, tachet ouz unan anezo, eur skritell hag e krede e oa shrivet warnan ar gariou-man: *Difennet eo mont er c'hoad!*

Met n'eo ket eus a draou evelse eo e oa ano war ar skritell: setu aman petra lennas warnan:

Rampsed didruet a ra er c'hoad-man o annez;

gwech brasoc'h eged eun den, garo e zaoulagad, baro hir ha digempenn war e zremm; sellet a rae ouz Youenn hag e c'hoarze.

Youenn a glaskas sevel en e zav; met tapet e voe krog ennan kerkent; liammet e zivesker hag e zaouarn, taolet war gein ar ramps hag en hent.

Kastell ar Rampsed

Goude bezha graet eur pennad mat a vale ec'h en em gavas ar ramps dirak eur c'hastell bras; silepet a eure Youenn en eur zal vein el lec'h ma oa nasket c'hoaz eur verc'h yaouank hag eur strobinnellez koz.

Ar verc'h yaouank a lavaras da Youenn e oa mestrez-skol hag e oa deuet gant he bugale-skol da ober eur bale dre ar c'hoaz; diou verc'h vihan dizen a oa pelloc'h diouz ar re all ha tapet gand ar ramps; o klask dont war o sikour e voe paket heunan ha kaset da vanez ar rampsed.

Ar strobinnellez koz a oa bet, e kreiz an noz, o klask louzou-strobinnell dibaot er c'hoaz; paket e oa bet ivez ha breman, hep galloud ebet ken da strobinnella he nesa, e ouie n'he devoa truez ebet ken da c'hortoz digand ar rampsed, he enebourien fouet, hag e kounnare; malloziou a hep seurt a diale war ar rampsed ha war ar re a oa en eron evelld.

Endra n'edo Youenn o trei hag o tistrei mennoziou tenval, en e benn, e voe digoret an nor ha kaset ar brizonid gand ar ramps, en eur zal all, el lec'h ma oa daou ramps all brasoc'h c'hoaz, eun tamm mat, eged an hini en doa o fakel.

Eun dervez mat hon eus graet, aotrou, a lavaras ar ramps kerka, eur mevel eo evit douez.

— Han! han! a lavaras ar mestr, en eur c'hoazin hag en eur ziskouez dent hir ha melen, evel eur eur bleiz, paket out pelloc'h, strobinnellez koz, va oanig paour, va danvez-pried karet!

— Amprevan, gagn brein, debrer kig mab-den, a lavaras ar strobinnellez koz, en eur grenn gand ar spoun.

Ne lavaras ket pelloc'h; ar ramps, en e zav, en devoa distaget en he za-a-dreuz, eur pikol taol troad he gvinas betek an treustou; a-raok m'oa kouezet d'an douar, ar ramps all a zistagas ganti eun taol all he gvinas adarre. C'hoari a rejont evelse, eur pennadig, betek ma voe maro mik ar strobinnellez koz.

— Kemerit hi, breman, a lavaras ar mestr, ha lakit hi d'hocthu ouz ar ber; n'eus netra gwelloc'h eged ar strobinnellez-ze pa vezont poazet d'hocthu goude o maro; anez da-ze e teout da veza goevn evel ler hag e vezont hanter vrein a-raok ma teout da veza bouk.

Youenn a c'halv Miaoulig

Evid ar paotr hag ar verc'h yaouank, ar re-ze a c'hell gedal c'hoaz; kig a-walc'h hon eus breman; koulsgoude, piou a oar an troiou kamm a raio d'omp ar c'horriganed milliget. Rak-se, gwelha a zo da ober eo trouc'ha o gouzoug d'ezo d'hocthu hag o lakat er c'helorn goude beza o gwadet mat.

Kaset e voe neuze Youenn hag ar verc'h yaouank er mez hag ec'h en em lakeas eur ramps-

mevel da lemna eur pez kountell vras war ar vlerim epad ma stage eur ramps all eur sug ouz eur post-kroug da grouga an daou gez evit gelout o gwada evel ma vez gwadet ar yer.

— A! Miaoulig, a lavaras Youenn o welet edo ken tost d'ezan ar maro, ha ma 'z edo, deus d'am skouzella breman 'ta!

Klevet e voe neuze eur c'houez dudius a lenias ar porz; Youenn hag e genellez a gleve ar c'houez-ze hag her c'have mat met ne bilje tamm ebet d'ar rampsed.

— A! pebez c'houez fall! emezo; hag e kotez-jont slemplet.

O welet e oa eun nor zigor war ar c'hoaz, Youenn hag ar verc'h yaouank a dec'has kuit; redet a raent buana ma c'hellent da bellaat diouz maner ar rampsed.

Pa weljont e oant pell a-walc'h, ar plac'h a gimadias diouz Youenn hag a gemeras eun hent hag a dlie, emezi, he c'has buan d'ar ger.

Youenn ivez a gendalc'has diouz e da warzu bevnen ar c'hoaz.

Youenn hag ar c'horrig

Abenn eur pennadig bale ec'h en em gavas dirag eur c'horrig bihan a oa azezet war eur pilgoz hag a oa o klask ober eur gountell goad. Hanter moal e oa ar c'horr; eur penn teo en devoa hag eur baro hir hag e selle a-gorn ouz Youenn.

— Mar plij, Aotrou, eme Youenn, dre belec'h eman an hent da vont eus ar c'hoaz-man?

— An hent da vont er mez, mignon koant, n'eo ket diaes da gaout; sellet deuit war va lerc'h; ez an d'ho plien.

Ar c'horr a en em lakeas da redek gand eun herr estlammus evid e zivesker berr; Youenn a yea d'e heul; goude eur pennadig bale, hanter a welas e teue ar c'hoaz da denvalat gwasoc'h gwas hag e kave d'ezan edo o vont da goueza adarre e kastell ar rampsed.

Chom a reas a-zav hag e c'houennas ouz e vlenier ha war an hent mat edo.

— Penaos, eme ar c'horr, droug eman; anaout a ran ar c'hoaz michans; deuit buan ma n'ho peus ket a c'hoaz da veza kollet.

Ali Miaoulig

— Me a garfe kaout ali Miaoulig, a zonjas Youenn.

Eur gazez wenn-kann a lammus neuze war an hent; ar c'horrig gand eur youc'haden a gounnar a zailhas warni; ar gazez avat a zankas he skifton lemm en e fri; pennfollet gand ar hoan ha dallet gand ar gwad, ar c'horr a dec'has en eur youc'hial gand kounnar.

Ar gazez a dosteas neuze ouz Youenn; en em frota a eure ouz e c'har en eur viaoual gand leve-vez hag e tiskouezas d'ezan gand he fao, he doa c'hoant d'e welet o vont war he lerc'h. A-henn eun eur vale ec'h en em gavjont o daou war eul letouenn ec'hon, bevennet tro-war-dro gand gwez sapr; e kreiz al letouenn e oa eun ciennenn hag an dour anezi a rede etrezek ar c'hoaz, en eur hiboudal dre ma stoke mein ha bill ar c'houer;

laboused a bep ment hag a bep liou a richane er gwez tro-war-dro.

Ken doue e fiskekne ar peoc'h en e ene, el lec'h-se, ma n'en doa Youenn nemed eur c'hoant; chom eno alao; Kerken e voe gwelet o tigue-zout war ar c'hlaenn eur bern korriganed bihan; bihan e oant evel bugale ha kenedus kennan. O dilhajoan a oa e liou an aour hag an arc'hant; o bleo hir ha melen dalc'het kempenn, war o zal, gand eun daledenn aour, marellet a vein prestus, a c'holoc o c'hein hag a goueze heteg an douar.

Trei ha distrei a raent war ar c'hlaenn, en eur gorolla, skanv evel lahoused, herrek evel an avel.

Youenn a zelle, bamet holl, ouz an arvest brao-ze; koulsgoude pa voe echu ar gorolladeg e tosteas ouz ar c'horrilerezed hag e c'houennas onto!

— Hronezed, daoust hag ar vadelez ho pefe da lavaret d'in penaos e flean en em gemeret da vont er mez eus ar c'hoaz-man?

Eur gorriganeg a en em zistagas neuze diouz ar re all hag a lavaras:

— Youenn Penelo, gouzout a rit eo difennet p'eurvia ouz mab-den gwelid an arvest emaoch o pouez gwelet; koulsgoude, p'eo gwir hon eus bet digant hor rouanez an urz da veza hegarat en ho kenver ez an d'ho kelenn. C'houez ramps a zo o chom er c'hoaz-man; tri mestr ha tri mevel; tri gorrig o deus ivez da vevellen; Jip, Jap ha Fri-kamm a raer anezo; Jap eo an hini ho peus gwelid; ma vije bet kouezet Fri-kamm warnoc'h, sur a-walc'h, ne vije ket bet troet ker brao an traou ganeoc'h rak Fri-kamm eo an drouka, an ijinusa hag ar gwidreusa eus ar gorrige. Ni, korriganed, a stourm, muia ma c'hellomp, da ziframma digand an diaoulou-ze an dudigont keiz a gouez etre o skifton. Setu aman petra ho peus da ober da vont er mez eus ar c'hoaz; mont a reoc'h war eun, dre an hent a zo dirazoec'h, hep distrei ho penn, n'eus fors petra g'levec'h a-dreuz d'oech hag hep skrabat ho tivesker neus fors pegement a zehron ho pezo enna. Ma sentil mat ouzin, abenn div eur aman, e vezoec'h er mez eus ar c'hoaz.

An holl gorriganed a deuzas ha Youenn a en em gavas e-unan war ar c'hlaenn; laouen e kemas neuze penn an hent diskouezet d'ezan da guitaat ar c'hoaz milliget.

Touellerez ar C'horrred

N'en doa ket graet kant kammed ma klevas unan bennak ouz e c'hervel.

— Aotrou, Aotrou, va gortozit 'ta, en hano Doue!

Sonjal a reas avat e oa difennet outan trei e benn hag e kendalc'has gand e hent, pa grogas eur gwall zehron en e c'har zehou; a vech en doa sojjet e oa difennet outan en em skrabat, ma krogas en e c'har gleiz eun debron all kals krenfoch c'hoaz eged an hini en devoa en e c'har zehou; herzel a eure, koulsgoude. Tostaat a rae ouz lez ar c'hoaz ha dont a rae ar gwez da veza tanofoc'h pa glevas en e a-dreuz eur vouez truezus, henvel tre ouz mouez e vamm.

— Youenn! Youenn! deus d'am sikotr 'ta, va mab karet.

Distrei a eure da zellet hag ec'h en em lakeas da furechal ar bodou a oa eno; ne gavas netra; gwelet a reas avat eur c'horrig hag a fureche eveltan:

— C'houi eo ho peus youc'het, Aotrou? eme Youenn, droug emman.

— Me, youc'het? A! nann avat, a cilgerias ar c'horrig, ker seven ha tra ha gand eur vouez kinn; met eur youc'haden am eus klevet hag e klasken gouzout piou en doa youc'het. Klaskomp hon diou, mar plij ganeoc'h; c'hoant am eus da gredi, koulsgoude, en deuet ar vouez eus ar bodou a welomp a-hont pelloc'h.

Klask a reont eta hag en eur gomz flour ha brao ouz Youenn, ar c'horrig a bellae, a bellae atio. Evel ma ne gave netra, Youenn a zavas e benn da gonz ouz ar c'horr; neuze her gvelas, oc'h ober goap amezan, eur pikol penn-haz gantan en e zourn.

Ar c'horr a youc'has eur garmaden skiltir ha daou gorr all a zigouezas eus a-dreuz ar gwez, el lec'h ma oant kuzet, hag o zri e sailhont war Youenn; heunan a oa krenv ha skanv evel eur gwinner; en em zifenn a eure gand kalon. Hanter zistaget en doa eur skourm da Jip gand eur mestal penn-haz ha roget fri hir Jap gand eun taol all.

Fri-kamm avat an hini en doa e zigaset er griep e reas buan tro hor mignon gand epad ma c'hoaric ar re all outan a zistagas gantan eun taol a-dreuz e zivesker.

Youenn a gouezas a-stok-korf d'an douar; ar c'horrred a gendalc'has da skei gantan ken na weljont ne finve ket ken:

— Chomit aze da zioüall ar c'hagn-man, a lavaras Fri-kamm, ma 'z in da gas kelou d'ar maner, d'ar red, da zont d'e ger'hat.

Hag ez aes kuit.

— Petra, eme Jap, hennez c'hoaz a zo gouest da lavaret en deus paket, e-unan, ar paotr hag en devezo e vouedenn-henn, e gopr. D'omp 'ta, war e lerc'h, raktial, d'e zislavaret.

Youenn paret gant Miaoulig

Youenn a jomas e-unan. Kerken, eur gazez wenn-kann a lammus diouz eur skour, el lec'h ma oa kludet hag a dosteas outan. Klask a reas louzou c'hoaz-valet elouz ar geot hag o lakeas dindan fri ar paourkez. Gand louzou all e froas e izili brevel. Dispar e an al louzou-ze, exit doare, rak a-benn eur predig, Youenn a zigoras e zaoulagad. Gand poan e c'hallas en em jacha, blienet gand ar gazez, betek eur wezenn gleuz, el lec'h n'en em astennas war eur gwele kinn sec'h; ar gazez a zerras warnan an nor rusk; mail oa; rak, kerken, dre fraillou an nor, e welas daou ramps, blienet gand Fri-kamm o tout d'e ger'hat. Youc'hal a rejont gand ar gounnar pa weljont n'edo ket mui ar paotr eno hag eur bern malloziou a daoljont war ar c'horriganed, o doa, emezo, graet an taol. Eiz dervez e chomas Youenn en e wezenn gleuz; e vignonez, ar gazez, a entente outan gand evez hag a zigase d'ezan ar frouez c'houeka a gave dre ar c'hoaz.

Ar varrenn houarn

Eur wech ma voe pare mat, e voe laket war hent ar ger gant Miaooulig a gimidiad dioutan en eur ronral. Chom a eure, en taol-man, hep distrei e benn hag heb en em skrabat hag e'ch en em gavas war lez ar c'hoad. Eno, avat, e oa eur varrenn-houarn rus tan hag a vire outan da dremen. Eur vaouez koz a oa, e-kichen, o'ch ober stann, azezel war eur skoun hag a droe he c'hein da Youenn. N'oc'h bras, hennan a dosteas ouz ar vaouez koz hag a c'houlenmas outi penaos tremen.

— An dra-ze ne zell ket ouzin-me, emezi, hep distrei he fenn; ne n'emaoun aman nemed evit miret ouz unan bennak d'en em leski; n'ouan ket ar vestrez; m'atez ar varrenn n'ouan ken!

— Ezomn am bezo c'hoaz eus a Viaoulig! eme ar paotr.

Rouanez ar c'horriganezed

A vech m'en doa lavaret ar ger-man ma welas ar varrenn rus o'ch en em zanka en dour gant em trouz hevel ouz trouz houarn rus soutet en dour hag e lec'h eur vaouez koz, Youenn a welas eun itron gaer gwisket gant dilhad kel lufus ma oa diaes sellet outi. Rei a rae an dour d'eur verch yaouank gwisket e gwenn, eur zeizenn wenn war he zal, eur blec melen aour war he c'hein hag a en em zalc'he dirak Youenn; o stoui he fenn hag en eur ruzia e lavaras:

— Me eo rouanez ar C'horriganezed, hag houman eo Miaooulig, va merc'h karet; Youenn Penelo, diskouezet ho peus ho kalon er c'hoad; karet o'ch gant va merc'h; her rei a ran d'eo'ch evel pried; eur pried mat ho pezo; met taolit evez; m'he devozo ugent vloaz nemed a-benn c'hoac'h miz aman hag a'clian di e rank chom dindan bel an diaoul hag ar rampsed. Bemez e rank kaout eur skudellad laez livris hag, en deiz m'he do ugent vloaz, e rank gwiska ar zae zeiz he deus breman; taolit evez mat avat, rak ma tigouefe d'ar zae-ze oza roget, dre eur gwall zarvoud bennak, e kouefe Miaooulig raktal dindan hel hon enebourc'h.

Youenn ha Miaooulig a gimidiad neuze diouz ar rouanez hag ez efont etrezeke ar vilin.

Gand eul levenez hep par e voent digemoret gand o zud hag, en dervez warlerc'h, an Aotrou Person a eureije Youenn ha Miaooulig en e iliz-pareiz; gouelou bras a voe lidet hag holl dud ar barrez a voe pedet d'an eured. Evel ma oa karet ar milner hag e val gand an holl, an holl gwiliunan a voe laouen eus o eured.

Laouen hag eurus e vevas Youenn ha Miaooulig epad c'houec'h miz; muioc'h mui e'ch en em garent bemez ha muioc'h mui e oa karet Miaooulig gant he zud kaer, rak gwec'h ebet ne oa bet gwelc'h eur wreg yaouank ker seven, ker brao ha ken ampart evit pep labour.

Ar zae zevez

En em gaout a eure dervez bras he ugent vloaz; Miaooulig a wiskas he sae eured; betek an noz ne c'hoarvezas netra. Goude koan e'ch en em lakeas

Miaooulig, Youenn hag o c'herent e kichen an tan, da ober eur varvailhadenn, da c'headal taol an haoter-moz, an eur merket evit ma vije dieubet Miaooulig eus beli an Diaoul.

Unnek eur a zonas en orolach; a greiz ma ne doae den ebet evez, eur c'hloaenn a strinkas eus an tan hag a gouezas war zoutin ar vilinerer koz. Pep bini a zavas d'he mouga; Miaooulig en em gavet da genta, o klask mouga ar c'hloaenn a grogas an tan en he sae; Youenn d'ar red a vougas an tan, met eun toull bras a jomas e sae Miaooulig. Ar wreg yaouank a deuas raktal da veza gwenn evel eun tamm paper; sleuzia a raes hag en he lec'h ne jomas nemed eur gazez wenn a lammias, er mez, dre ar prenestr, gand eur viaouerez truezus.

En oaled e weljod neuze dremm divalo Jip, an hini en devoa strinket ar c'hloaenn war varlenn ar vilinerer koz; Youenn a lammias warnan; ar c'horrig, avat, a sleuzias, gand eur c'hourzadenn c'haro.

Ker sabatbet e oa Youenn, ma chomas daou zervez hep debri tamm; azezet e chome war e gador e tal an tan, Jip ranna eur ger. Sonjal a reus, avat, en doa gwelloc'h da ober eget chom da boukka sonjou ha goude beza kimiadet adarre diouz e dud, hag hen ha dao etrezeke koad ar rampsed, fouet gantan e raje unan a zoun pe adkaout e wreg pe vervel.

Youenn hag al Louarn

En eur vont er c'hoad e welas eul louarn o font davetan:

— Da glask dinaska Miaooulig, ho kwreg, o'ch deuet ta, Youenn? eme Lamig; ma kirit e roin va skouzell deoc'h.

Souezet e voe Youenn, e gwirionez, o klevet eul louarn o komz; koulsgoude, gwelc'h en doa c'hoaz traou all ker sebezus hag an dra-ze hag e'ch elgerias:

— Trugarez d'eo'ch, Aotrou Alanig, ha penaos eta e rooc'h skouzell d'in?

— Diframmit teir vlevenn diouz va lost, eme Lamig; lakit anezo pep hini d'he zro, en ho lourn ha c'hoazit warno!

Youenn a reas ar pez a lavare al louarn d'ezan hag ar vlevenn genta a deuz da veza eur gountell hira.

— Ar gountell-ze, eme al louarn, n'hell ket kro'chen eur ramps herzel outi; kement gouli e vez graet diwarni a ro ar maro.

Trei a reas an eil vlevenn en eur voest-butun.

— Talvoudus bras e vezo ar voest-man d'eo'ch ivez, rak kerket ha m'he lakeoc'h dindan fri unan bennak e chomo kousket epad div eur.

An trede vlevenn a deuas da veza eur re vanezou.

— P'ho pezo ar manegou-ze en ho faouarn, den n'ho kwelo; it breman en hent, met arabad eo d'eo'ch ankounac'haat eo difennet ouzoc'h tenna talvoudigez eus a zrou eus an tri dra-ze a-gevred; an eil goude egile eo e rankit labourat ganto.

Hag al louarn a lammias warlerc'h eur c'had a oa o treuzi an hent.

Emgann an daou ramps

Laouennet eun tammig, Youenn a gendalc'has gand e hent, pa glevas mouezioù o tostaat outan; buan e lake a zaoarn en e vanegou. Daou ramps-mevl e welas neuze, harp outan, o komz ouz Jip. Tostaat a eure hag e tistagas eun taol penn-haz war c'har unan eus ar rampsed:

— Perak eta, e roit d'in taoliou troad, evelse? a lavaras ar ramps.

Youenn, neuze, a zistagas eun taol all e gar ar ramps all:

— N'eo ket me eo a ro taoliou d'eo'ch, eme an eil ramps; met c'houi avat a ro d'in!

Neuze Youenn a zistagas taoliou a-geiz hag a-zehou.

Kounnaret o kredi edont o skei an eil gand egile, an daou ramps a en em lak d'en em ganna evel tiri pennfollet, ken na gouesjont d'an donar o daou, hanter zialanet.

Youenn, neuze, a dennas e vanegou hag a zankas e gountell e kalon pep ramps.

Ar c'horrig avat a oa en em lakel war e zaoulin hag a c'houlenne traoz; lost e voe Youenn d'e espern dre abeg e zempladurez, met klevet a eure eur vouez o kana:

Truez ebet rak ar C'horrig.
En he zoull-bac'h a wask Miaooulig;
Fall eo e lezel e buhez
Bez outan eta didruez!

— N'eo ket gwir, eme Jip, eun all marteze a zo hag a wask Miaooulig, met n'eo ket me eo.

Hag e'ch en em rulle ouz treid Youenn; hennan avat, hep gortoz pelloc'h, a vruzamas gand eun taol penn-haz, penn ar c'horrig fall.

Glazenn ar c'horriganezed

Neuze ez eas daved glazenn ar c'horriganezed; digaset en doa gantan sae zeiz Miaooulig ne oa nemed ar C'horriganezed hepken hag a vije barek da gempenn an toull graet enni.

Pa en em gavas war ar c'hlaenn e welas edo e kavu an holl draou; hiboud an dour a oa evel eun buandenn; lavet e oa al laboused hag ar geot n'oum mui ker glas na kel laouen ha kent Lakat a reas ar zae e-kichen an eienenn ha neuze e voe klevet eur vouez o kana:

— Mall oa d'in em gaout, Youenn Penelo, rak ar rampsed o deus masket Miaooulig en eun toull-bac'h tenval; ar ramps, ker marbounk hag eur bleiz, ne zehr nemet kig mab-den ha lavarout a ra az tapo bremaik hag e taolo, en eur c'hoazinn, ouz treid Miaooulig, da benn trouc'het ha gwaded; dioull eta, paotr, en aoun da veza tapet, rak ma vefes lazet setu aman petra a c'hoarveste; Miaooulig a deufe da veza pried ar ramps; kollet e vije korf hag ene; karet a rafe o banvezioz; ankounac'haat a rafe hor sonjou hag he yez a deufe da veza hini an diaoulou-ze; o, paotr karet ganeomp, gand a ri, na zistro ket hepd'i!

— Dre zae va mamm goz, a douas Youenn, divac'het e voe va fried pe e varvin.
Tou dre zae ar vamm goz a oa eul le rus spountus e tiegez ar Beneloed.

Youenn, neuze, a yeas daved maner ar rampsed; buan a-walc'h e'ch en em gavas dirak toull an nor a oa digor frank ha goude beza laket e vanegou burzudus ez eas chas.

E Maner ar Rampsed

C'hoarierien, voulou a oa er pora hag ar boullou a oa ganto a oa pennou tud kaladet.

Youenn a dremenas en o c'hichen hag a en em gavas er gegin el lec'h ma kavas ar mevel-ramps a oa e-unan, breman, o lehiri eur vorzed-bugel, en eur c'hosmolat war e genellid ha ne ziroent ket.

Youenn a yeas a-dreñv e gein ha goude beza tennet e vaniegou e lakeas e voest butun dindan e fri. Raktal ar ramps a gouzas kousket mik hag e'ch en em lakeas da roe'hal gand kement a drouz ha kant pennoc'h lart o'ch hoac'h holl a-gevred.

Youenn a yeas pelloc'h hag e'ch en em gavas gand daou gorrig, Jap ha Fri-Kamm. Klevet a reus Fri-Kamm o lavaret da Jap ez edont o daou o vont da welet Miaooulig.

Youenn a yeas war o lerc'h; diskenn a rejont d'iri doun hag e'ch en em gavjont dirag eun nor zero houarnet a zigoras Fri-Kamm. Kerket Youenn a welas e bried azezel war eur skoun izel; eun dourjadig koto gleb a rae he gwelc'h en he c'hichen e welc'h eun tamm bara kel louet ha ker kalet ma n'he doa ket getlet e zebri.

O welet Miaooulig en eur stad ken truezus, Youenn a grenas gand ar gounnar hag e stardas e bennbaz etre e zaoarn.

— A! ha! kaoulig, a lavaras Fri-Kamm, penaos eman ar hed ganeoc'h, hizio? ha kousket mat ho peus? ha c'houek e oa ho lip-e-hao? Aet eo hor mestr da hemo'he ha bremaik, hep mar ebet, e vezo jolori aman. Pebez eured kaer a vezo l'let? Ha n'oc'h ket laouen o sonjal pebez gva; brao ho pezo evit pried, ha bras ha kreñv? Marteze, avat, e vezo'ch kannel gantan met en em voaza a roe'ch diouz an dra-ze ne vezo'ch ket pell!

Hag evelse an daou gorr a reas goap ouz Miaooulig a zelle outo, gand fae, hep ranna ger. Pa voe echu, Fri-Kamm a dapas krog er goullou da vont kuit; pa dremene en nor, avat, Youenn a zistagas gantan eun taol penn-haz hen astennas war al leur; a-raok m'en doa getlet gouzout Jap petra a oa c'hoarvestet gand Fri-Kamm, en doa bet diwar e c'henou eur mestaol hen astennas divuhez war gort e genel.

Neuze Youenn a dennas e-vanegou hag e voe gwelc'h gand Miaooulig; laouen meur an daou bried a en em vristas gand karantez.

Met Youenn n'oa ket mestr a-walc'h c'hoaz war an dachenn rak pevar ramps a jome c'hoaz beu-buhezek. Lezel a reas eta Miaooulig en he zoull-bac'h, en eur lavaret d'ez e teije dizale d'he c'herc'hat. Youenn a yeas er zal-debri; daou ramps a oa eno kousket war e c'hadourin gand ar re govad o doa graet; tostaat a eure didrous hag e trouc'has d'ezo, d'ar ped, o gouzougou, Youenn a lakeas neuze e vanegou; mall e oa rak kerket ha m'en doa o gwisket edo an trede ramps en ti; en eur welet ar pez a oa c'hoarvestet gand e zrou gonsort e youc'has, gand e spount hag e gounnar,

ken na grene ar mogerioù : buan avat, e teuas ennan e-unan, hag ez eas da gerchat eur big douv hag a wele an traou kuz.

Er miz !

Yaonn ne jomas ket d'e c'hortoz; buan ez eas da gerchat M'haoullig ha d'an daou-lamm ez ejont o daou er miz eus ar c'hastell.

A vech m'edont er miz ma voe klevet unao o yudal spontous : ar ramps oa, o redet war o lerc'h blienet gand ar big.

Ma ne vije ket bet ar ramps kel leun e gof ha ma oa e vije ket eur c'hoari d'ezan tizout an dech'erien met ker pommereat e oa, ma n'oa ket gouest da c'houmud warno. Ar big, kludet, war e skouz, her c'hennerze :

— Kalon, mestr ; skuiz int ; tostaat a rit !

— E gwirionez, Youenn ha M'haoullig a oa en em gavet skuiz-divi, tost da c'hiazenn ar c'horriganeez. Eul lamm c'hoaz hag emaint warni. Ar ramps a glaskas mont eno war o lerc'h, met re bouner e oa evid al letonenn vuzudus : sanko a eure enni ; korriganeez elciz a deuas neuze, a hep tu, hag a en em lakeas da goroll en dro d'eo enebour a yea doumnoeh damma en douar. O welet e troc fall an traou ar big a dechas kuit hag a en em gludas war eur wezen el lec'h ma voe flemmet gand eur aer ; koueza a eure d'an douar maro-mik.

Pa ne jomas mui a-zioc'h al letonenn nemet penn ar ramps, Youenn a dostas outan ha war uiz ar c'horriganeez e trouc'has ar penneze ; toulet e voe ar penn gwadek e kreiz ar c'hiazenn

el lec'h ma voe bruzunet e mil damm dindan treid ar c'horriganeez.

Ar c'hastell o tarza

Klevet e voe neuze eun trouz spontous ha mein a goueze evel kazare'h tu ha tu; Kastell ar rampsed eo a darze evelse gand ar re a oa chomet c'hoaz ebarz. Setu aman penaos e oa c'hoarvezet an darvoud-ze, Fri-Kamm ne oa ket maro gand an traouliou en devoa bet : semplet e oa ha netra ken. Pa zhiunas, boudinlelet e benn c'hoaz, e klaskas kavout skierijenn. Kavout a reas ar c'hleuzeur kouezet d'an douar ha d'e dana e tennas tan diouz e vaen-tana. A-raok beza perc'hennet gand ar rampsed e oa bet eun foullad laeron o chom er c'hastell. Kannek ha debret e oa bet al laeronze gand ar rampsed ; o foullr avat a oa chomet en foull el lec'h ma oa bet klozet M'haoullig, rak ar rampsed ne raent netra gand ar poullr nemed a-wechou da c'houllena o boued.

Tonell ar poullr a oa breinet hag ar poullr fuilhet war an douar ; o klask tana e vaen-tana, Fri-Kamm en doa lakat an tan er poullr hag ar c'hastell, hag ar ramps kousket gand butun Youenn, koultz ha Fri-Kamm hag all a voe gwintet er vann.

Goude beza kimiadet diouz ar c'horriganeez, Youenn a yeas kuit gand e bried ; dizale e'ch en em gavjont er vilin el lec'h ma skuilhas o zud daerou a levezou ouz o gwelc rak kredi a raent e oant kollet pell a oa.

Youenn ha M'haoullig a vevas sioul hag eurus ha bugale elciz o devoe.

OLIER CHEVILLOTTE.



KELEIER AR MIZ

PRIZIOU DA C'HOUNIT HA VAD DA OBER D'HOR YEZ

Bremen ez eus tri miz e komzemp aman eus an ezomm bras hon eus da zastum ar gerioù brezonek ha n'int ket gwall anavezet gand an holl, nemet e parrezioù a zo. Epad an hanv hon eus klasket dastum anioù Bleunioù Breiz.

Hiviken, hep miz epad ar goanv, e stagimp goud eun ENKLASA nevez ha setu perak epad miz Here bo pedan DA ZASTUM an HOLL ANOIOU BREZONEK implijet en dro d'esch evid havel, eul lodenn pe lodenn eus KORB AN DEN; netra nemet evid havel an eskern a zo o'eh ober diazez hon izili e vo red d'eo'eh kaout dioc'htu n'ou-zoum ket ped ha ped ano.

Skoudernoù a c'helloc'h da ober eus korf an den gand an anioù e kichen pep lodenn, evid ma vo gouezet kentoc'h ha gwelloc'h a-ze petra eo ar pezh ho penes c'hoant da havel.

Ar re a gavo ar mui anioù hag a vo skletra o la-

bourou a c'hounezo levrioù nevez ha talvoudus eus ar re vraoa.

Setu aze, lennerien vat, danvez labourioù hag e c'helloc'h pleuet warno, bremen, epad novezioù hir ar goanv; heiz ken niverus o'eh en em stapia gand an traouman ha ma o'eh gwechall gand an divindadennou.

Diged al labourioù-man, gand Gouellou Kals-gouev, da ziverzad, da M. le Directeur du Feiz ha Breiz, Plougnevan (Finistère).

AR BAOTRED YAOUANK A DLE MONT D'AN AFRIK

Ministr ar breiz en deus laket tenns dez ar miz evid gwelet pion, etouez ar zoudarded yaouank, a zo da vont d'ar c'hazara er miz-man, a vo da vont d'an Afrik hag eo kouezet gand ar re a zo gant d'an 18; rakse ar re a zo gant d'an 18 a viz me, d'an 18 a viz mezeven, d'an 18 a viz gouere, d'an 18 a viz eost, d'an 18 a viz gvenzolo ha d'an 18 a viz here a vo da vont d'an Afrik en doizout a zeu; ma ne vez ket gwall'eh ganto e vo kemeret ar re gand d'ar 17, d'ar 16 hag all.

Bernioù traou chomet eus a zilerc'h an Amerikaned, ar c'hallaoued hag ar Zaouan
 Bouteier, dilhañjou, meser, lieh, roubl, gwelou, pallennoù, linnoù, goll'hejioù, mat'almennou, hag all.
 Ar vare'hadourez a breinet a vezo kaset a eoc'h d'ho lefr.
TI LE CORRE
 an 11 a zo o'eh ober Korf etre ar ru Branda hag ar ru Victor-Hugo, harz ouz HIZ-sant-Iliad VIT'ET.

Gouennit e ti ar marc'hadour ar Zoavon
 e galleg « Le Plus Chic »
 Henna ez ar gwella !

Entreprises J. PLOUE - J. COLLIÈRE
 36, rue de Siam BREST
J. PLOUÉ
 Déménagements - Camionnage - Transit - Transports
 Caïres - Wagons - Autos Capitonnées
 R. C. Brest, 600. Ad. Tél. Ploou-Brest. T. 63 0-83

Evit beza asuret mat, en em adresit d'ar gomparanoù evit hoc'h holl asuransou (ar vuhez, an tan, an dervou hag all).
LE NORD
 BOUCHÉ-PILLON ha LE GALL, 1, ru Nive-Hign, BREST, e korn ru Brest.
 (Komzet e vez brezoneg.)

Klanavourien !
 An efedusa eus al louzeier da grenvaat ha da buraat ar gwad eo al louzou diwar lod-mor ha raz-eskern. Hogen eus an holl louzeier diwar lod-mor ha raz-eskern — stank an niver anezo — ar reisa hag an efedusa dre ma tan war-eeun eus ar bezin-mor hag an eskern fresk eo, hep mar a-vel d'an holl, an ULMINUCINE MOREUL, al louzou gal-loudek-dreist, anavezet dre-holl e Breiz hag en deus savetekt kement a vuhzioù prizius.
 Mammou tiegez, ha d'eo'eh bugale blinik, disliw, fall da grenvaat ha diwezat da greski, pe merc'hed diaes d'ezo dont d'o oad-krenn.
 Maouezet digonezet gand tro an oad, na droiait ket da gemer an ULMINUCINE MOREUL, azot gand an D' en Apotikerezh Th. MOREUL, lorec gand Akademi ar Medesinerez, ar pezh a ro testeni war e outiegezh. Kasit ho kwad, ho skopadennou, ho traoz d'ar Grande Pharmacie MOREUL, Landerne.

Statice Nevezioù Bras
Aux Galeries Saint-Martin
 108 à 112, Rue Jean-Jaurès
KOANTA NEVEZIOU GWELLA PRIZIOU
 Kawet e vez dilhad graet, en amans, ha graet e vez, goude kemeret ar vent; dilhad nevez evid ar waered hag ar baotred yaouank.
DREIST EVID AR MEZERACH DU HAG A LIQU
 Evit an dud diwar ar maez

AUX
DAMES DE FRANCE
 95, 97, 99, Straed Siam, BREST
 -- BRASA STALIOU ER VRO --
 NEVEZIOU -- DIANKACHOU-TIEGEZ
 ARREBEURI -- TRAOUACHOU PARIZ
 Ar uella marc'hadourez evid an izela priz
 Ar marc'hadourez prenet a vezo kaset betek ho ti gand kirri dre dan.
 Tud an ti a car Brezoneg

Hadou potach ha brouskon, hadou bleunioù
 Hadou dibadet eus ar gwella tiez
TI A. HUON
 Savet e 1840
L. AUDREN, DEUT WAR E LERC'H
 17, Straed Siam — BREST
 Télé. AUDREN-GRAINES-BREST. Téléph. 5-35
 BINVIOU - PESKETA
 KERDIN - SIFELL A BEP SEURD
 Brezoneg en ti TI A FIZIANS R. C. Brest 49

Pompad
 ha
Bloud NOELLINE
 a bare Ruzderioù ar vugale NEVEZ-GANET
 Ar Pompad Noelline a zo ar gwella bloud ouz
SPINAC'H AR BRONNOU
 Priz pep louzou, 15 real.
 Kaset e yez gand ar faktour evid 20 real.
 pour un Echantillon
BON GRATUIT
 A envoyer au Laboratoire NOELLINE
 75, rue de Siam, Brest



Feiz ha Breiz a zo pevar real ar pez

BREST, MOULEREZ AR SKRIDOU MAT, 4, STRAET AR C'HASTELL

